

Kere

Kanaouennou Kerne

Jean Quéré (Yann Gere) a oa bet ganet e Plouenan e 1825. Mervel a reas e Kastellin, leh ma oa person, e 1898.

Tresadennoù a zo el leor. N'int ket bet lakaet amañ.

Tra souezuz : ne oa ket bet merket ano an oberour war al leor.

Embannet e oa bet al leor-mañ e 1900. Modernnaet eo bet an daore-skriva.

Eur ger a-raog

Da genta, ne zoñjen ket skriva, 'vid divenn ar pezh 'zo merket el levr-mañ.

Da galz tud em-eus lennet ar fablennoù, da galz all em-eus kanet ar gwerziou hag ar hanaouennou 'zo ennañ. Oll int bet kavet, bep tro, deread meurbed hag, atao, on bet aliet d'o has da voulla.

Koulskoude, meur a hini, marteze, a gavo abeg.

Lod a raio fae - « Sorhennou" ! a livirint, traou netra ! Da ober petra o lakaad war baper ? »

Lod all a skrijo pa welint eul levr skrivet e-giz ar Gonideg¹. Ker kustum int da lavared droug diwar-benn an Aotrou kêz-se, ma kredont beza lamet, evid biken, e ano deuz al levriou brezoneg.

*

**

An traou 'zo el levr-mañ 'zo bet skrivet pell amzer 'zo. An hini en-deus o skrivet a zo maro. E-pad e vuhez, en-doa eun teod lemm, hag e bluenn a flemme 'vel eun douchenn fouet. Mez ne zavo ket evid divenn ar mod en-deus kemeret da skriva ar brezoneg. Ragese, paotred ar hramadeg a vezo tud sod ma teuont da grial ha da sponta.

Evid ar re all, ar re a raio fae war an traou 'zo kontet el levr-mañ, e tegasin da zoñj deuz gerioù lavaret gand an Aotrou Gwillou, hag o-deus kavet, sur on, kaer evel ar wirionez :

Heb eur begad pebr hag holen
Eo meurbed goular ar zoubenn.
Er giz-se ma n'hoh-eus bemdez
Nemed labour tenn hag enkreuz
E vo divlaz ho tevezioù :
Red eo kaoud plijadur a-wechou.

¹ eul levr skrivet e-giz ar Gonideg : n'eo ket gwir penn-da-benn. Eur bern viou-koukoug a zo ouspenn.

Al levr-mañ n'eo ket greet evid beza lennet en iliz, e-pad an overenn ; n'eo ket greet, zoken, evid beza lennet, e stern an daol, an tokou diwisket, evel pa lenner "Buhez ar Zent" pe "An Aviel".

Greet eo evid beza lennet e korn an oaled, goude koan ha goude ar pedennou, pa jomer da domma e-kichenn an tan ha da gonta koñchennou, e-pad ar goañv. Greet eo, c'hoaz, evid beza kanet dre ar parkeier, e-pad an hañv, evid lakaad an dud a rank labourad o eost a-zindan an noz, da veza laouen ha da ankounac'haad o skuizder.

Breiziz a gar an traou devod :

« Lavar din, anaoud a rez ar vro
A gar he gizioù koz, atao.
E-leh 'peder c'hoaz en ilizou
Hag er vered war ar beziou ? »

Mez karoud a reont ivez soniou ha gwerziou :

« Lavar din, anaoud a rez ar vro
E kaner gwerziou ha sonio'
E-tal fornigell, beb noz
E koun oberiou ar re goz ?² »

Ar vro-ze eo Breiz-Izel.

*

**

Al levr-mañ 'zo greet, ivez, evid rei soñj da re all, dre ma kavint soniou koant ha gwerziou kaer, d'o dastum ha d'o mired. Nag a draou deread, greet gand ar Varzed, a zo kollet, siwaz ! abalamour n'int ket bet kaset da voulla ! Ma vije bet kutuillet oll zoniou ha gwerziou an Aotrounez Gwillou, Pouliken, Keinneg, Gwizouarn, Herri ha n'ouzon ped all, nag a vleuniou kaer on-dije bet, hirio, e levr ar Barzoneg.

Ouspenn-ze, en amzer vremañ, ar skoliou, skignet e pep parrez, a ra brezel d'ar brezoneg. Mil aon 'zo na rankfe yez on tadou kila dirag yez Vro-Hall. D'ar bugaligou er skol e vez desket soniou galleg. Ar soniou-ze a ganont c'hoaz pa vezont deut en oad.

Erruet eo ganen mond da veur a eured. Bep tro, pa veze debret lein , an dud yaouank en em lakae da gana. Mez, morse, n'am-eus klevet kana eur ganaouenn vrezoneg. Atao, soniou skrivet, peurliesha, e galleg-saout, hag a veze, aliez, siwaz ! gwall dizoare o anavezoud. Sur, ma vefe roet da Vreiziz soniou ha rimadellou kaer, e brezoneg yah, e vefe laosket a-gostez koz kanaouennou ar Hallaoued hag e hellfem lavared neuze 'vel ar barz :

Keid 'vo kerreg en aod ar mor

² Fañch an Uhel

'Kano ar barz war dreuz e zor,
Bepred, en yez koz an Arvor.³

³ N'eo ket bet sinet ar rakskrid-se. (Disheñvel braz eo an doare-skriva orin diouz hini al leor).

Taolenn

Eur ger a-raog

Lodenn genta : Kantikou : Itron Varia 'r Follgoad, kurunet

Kantik kent ha goude ar hatekiz

Kanaouenn ar pesketour

Eil lodenn :

Ar mab mahagnet hag ar vamm gristen

Kanaouenn ar mous bihan

Ar Roskoadenn

Al Luskadenn

Bale Even

Tadig-koz, ar brabañser

Trede lodenn : Soniou

Matilin an dall

Ar Jikolodenn

An ti-soul

Ar grougadenn

Lez-Ober

An daou vaout

An diou vondrask

Ar wreg yaouank o luskellad he mab hena

An amourousted hag an amzer

Kervadiou

Meuleudi da eur mignon, deiz e ouel

Lonk e zizun

Azor

Alanig al louarn

Ar pemoh

Mouzerez Schamdachemda

Ar mezverezed

Ar goabrenn zu

Ar Pod-houarn hag ar girin

Ar Skoul hag an Eostik

An daou gudon

Al louarn besk

An azen hag ar hi bihan

Peronel hag he fodad lêz

Ar haz hag ar marmouz

Al leon hag al koen gorneg

Marharid ar Herh neiz

An azen hag ar hi

Pevare lodenn :

Hirvoudou ar paotr kêz fumer, deiz interamant e gorn butun

Hirvoudou ar Barz er bloaz 1860

Hirvoudou an Tan Santel

Respont da hirvoudou ar Barz

Pempved lodenn :

Bloavez mad

Kanaouenn an alhweder

Kanaouenn al laouenan

Pemoh gouez

Son an Aotrou Fañch

C'hwehved lodenn :

Sklêredigez

Paotred ar Zabat

Kanaouenn Paotred ar Zabat

Kenta lodenn

Kantikou Itron Varia ar Folgoad, kurunet

Itron Varia ar Follgoad,

Evid ho saludi,
Tud an Arvor, an Argoad
A zired gand dudi
Eur gurunenn lugernuz a lakaer war ho tal
Hag eur helou ken eüruz
A ra deom tridal.
Diskan

Santez Mari, Mamm Jezuz,
Hag or Mamm venniget,
Mil bennoz d'an deiz eüruz
M'ho kwelom kurunet ;
Bremañ petra da hortoz
Ha petra da houlenn
Nemed c'hoaz, er Baradoz,
Gweled ho kurunenn.

Her goud a rit, or buhez-ni
A zo poaniuz-meurbed ;
D'al labour, heb damanti,
Ni rank staga bepred ;
Ha goude c'hwezi bemdez
Da hounid or bevañs
Ne jom ganeom ken danvez
Nemed on Esperañs.

Kalz o-deus brasoh madou,
Kaerroh deskadurez ;
Ni on-deus yez on tadou,
O feiz, o harantez ;
Ni a gar, e Breiz-Izel,
Or brezoneg, or feiz,
Skoulmet o-daou, Mamm zantel,
Gand hoh ano, e kreiz.

C'hwi her goar, ho kurunenn
A zeu a-berz ar Pab ;
Eñ eo tad ar gristenien,
Eñ eo Vikel ho Mab ;
Ni n'hallom nemed pedi.
Or pedenn 'zo dister
Pa'z eo nerzuz hoh-hini,
Harpit Kadorr Sant Pèr.

Bennoz d'on Eskob nevez
En-deus ho kurunet ;
Dezañ ha deom-ni, Gwerhez,
Roit ho skoazell bepred ;
Ha pa zeuio ar mare
Da vond da welloh bro,
Evid paea deom ho tle,
Or hurunit d'ho tro.

Evid kimiada

Bremañ, Gwerhez venniget,
Ni 'guita ho tachenn,
Gand esper mad eo skuillet
Ho kras en or herhenn ;
Skrivit don on anoiou
En ho kalon dener
Hag, e-kreiz on trubuillou
Bezit on eil Salver.

Euz or hostez e talhim
Soñj euz or Rouantelez⁴ ;
Dezi, keit ha ma vevim,
Ni zougo karantez,
Evid ma chomim atao
E reñk ho pugale,
D'he heul, dre 'n hent ma karo,
Ni boanio da vale.

Amjestr braz eo an amzer⁵,
Ar stourmad a zo kriz ;

⁴ or Rouantelez : or Rouanez

⁵ Amjestr braz eo an amzer : kaoz 'zo euz lezennou 1905.

Brezel a reer d'or Zalver,
D'e lezenn, d'e Iliz ;
Mez, pell da zizesperi,
Sur om, ni hounezo ;
On dorn a zo e dorn Mari ;
Netra n'on diskaro.

Respont ar Werhez

Kleved a ran ho pedenn,
Bugale Vreiz-Izel ;
Ya, rust eo ar wenodenn,
Ya, tenn eo ar brezel ;
Mez na gollit ket fiziañs :
Dorn Doue eo ar hreñva,
Ha lagad e Brovidañs
'Zo warnoh o para.

Euz va zu, Breiziz fidel,
Ha n'hen dizonjtit ket,
Me 'roio deoh va skoazell
Keit ha ma viot er bed ;
Ha, pa guitaot ho traonienn,
Me c'hoaz, ouz ho kortoz,
A vo, gand ho kurunenn,
War dreuziou 'r Baradoz.

Kantik kent ha goude ar hatekiz

A-barz ar hatekiz

I

Jezuz, va Zalver benniget,
Grit ma tigor va spered
Ha ma teskin, a wir galon,
Ho lezenn zantel ha gwirion !

II

Roit din ar hras ma komprenin
Ar wirionez a zesker din ;
Ha p'am-bezo he homprenet
Ar hras, c'hoaz, d'he heulia bepred.

War-lerh ar hatekiz

III

M'ho trugareka, ma Zalver,
Euz ho madelez em heñver ;
Desket em-beus, en ho lezenn,
Feiz ha deveriou 'r gwir gristen.

IV

Mez pazeogwir, eo poan gollet
Deski ar mad ma n'her greer ket,
Grit ma chomin, atao, fidel
D'hoh oll gourhemennou santel.

Kanaouenn ar pesketour

Or hanaouenn a zo dister
Ni 'zo pesketourien baour :
Or gwiskamant ne dalv diner,
Mez or pedenn a dalv aour.

Diskan

Mesait or bagig vihan
A-eneb ar gwall-amzer
Ha mar he diwallit outañ,
Ni 'lavaropemp Pater
En hoh enor, mamm dener !
Ni lavaropemp Pater,
Ni lavaropemp Pater.

Mar teu an avel da grozal
Bezit mamm or bugale,
Rag n'o-deveus den d'o diwall
Pa na vezom ket ganet.

Ar Pesketour hag e vagig
A dle dond da benn tri deiz ;
Mez aliez ar reuzeudig
Er mor don a gav e vez.

Eil lodenn

Gwerziou

Ar mab mahagnet hag ar vamm gristen

I Ar mab

O ! va mamm baour, pebez anken !
Peger kriz eo va flanedenn !
Me 'zo paour, me 'zo mahagnet,
Ar vuhez, din-me, 'zo kaled !

II Ar vamm

Va mabih ker, war an douar
Peb den en-deus e lod glahar ;
Den divahagn, den mahagnet
A ren o-daou buhez kaled.

III Ar mab

Mez, va mamm baour, ha pa welin
Tud all o vond skañv e-biou din
Ha me rankoud, 'hed an hentchou
En em stleja gand va flahou !

IV Ar vamm

Va mabig ker, an hent 'zo berr
A rod ar bed a dro lijer ;
Evel d'ar mor an dour a red
An dud a gerz war-zu 'r vered.

V Ar mab

Mez, va mamm baour, ha da hedat ?
Red e vo din mond da gestal
Ar paour, siwaz ; klask a ra
Pa na hell gounid e vara !

VI Ar vamm

Va mabig ker, a zor da zor,
Ne di ket da houlenn digor ;

Me 'zo ampart ; me 'labouro
Ha ganez me zaouhantero.

VII Ar mab

Mez, va mamm baour, me ho pugel
Eo a dlefe rei deoh skoazell ;
Mamm maga mab 'hed e vuhez
'Ve mantri diou galon bemdez.

VIII Ar vamm

Va mabig ker, eur vamm gristen
He-deus, a-galz, gwelloh kredenn,
Hi 'zo he brasa plijadur
Gounid bara d'he hrouadur.

IX Ar mab

Mez, va mamm baour, deoh ar hleñved,
Deoh ar maro a hell doned.
En dra-ze pa zoñjan, ervad
An doru a veuz va daoulagad.

X Ar vamm

Va mabig ker, gwel ar golvan
E-eunig ken dister, ker bihan.
Doue dezañ a ro bevañs :
Red eo fizioud er Brovidañs.

Kanaouenn ar Mous bihan

Me ne don nemed eur mousig
War eul lestr a Vreiz-Izel.
Ha ne ra forz ! va halonig
Pe du 'm foulzo an avel.

Diskan

Tad na mamm n'eus mui evidon ;
Breur na c'hoar n'em-eus em bro ;
Er bed-mañ n'eus ket eur mignon
Hag a hedfe va distro,
Nann ! hag a hedfe va distro.

Pa bign ar re vraz d'ar stourmad`
Ker prim on ha pep unan ;
Krena 'reer evid va oad
Ha me 'hoarz e-kreiz an tan !

Pa groz ar mor don, dijadenn,
An oll a ya d'an daoulin ;
Evelto me 'ra va fedenn
Gand truez outo, nann ouzin.

Mez pa zeu en Neñv dizolo,
Ar stered da lugerni,
Neuze me 'skuill daelou c'hwero
Hag a zeu d'huanadi.

Diskan all

Er bed-mañ, n'eus ket eur galon
Hag a hedfe va distro,
Mez an Neñv a hed ahanon :
Va zad, va mamm 'zo eno,
Ya, va zad, va mamm 'zo eno.

Ar Roskoadenn

Deh vintin pa darze an deiz en hent
Eur plahig a welis a Vreiz ;
Euz a Rosko eur plah yaouank,
Lilienn distaget diouz he brank !

Da beleh ez eer evel-se, plahig,
Hoh-unan-penn, ker beure-ze ?
Ha mar diwezfe d'ar hlizenn
Dond da hlebia ho pleo melen !

N'em-eus ket aon rag ar glebor, kloareg.
Me 'zo ganet war bord ar mor ;
Ha ma teuan eun deiz da woeñvi
'Vo dre vank dour d'am arozi.

Ha perag ivez dilezel, paourig,
Ar raden glaz a Vreiz-Izel
Evid sehi, e bro 'n estren
Evel eur peskig er gourlenn.

Meur a wech eh erru dr'ar goulm, siwaz !
Pa vez kousket, e koad Prad Koulm,
Beza taolet gand ar barrad
Dreist ar mor, pell diouz he neziad.

Mez pa vez skubet ar houmoul, eun tamm,
Pa deu an êr da veza sioul,
Kaer eo he hleved, adarre,
O kana flour e begou 'r gwe'.

Na peur e halli evelti, mignon,
Pelloh en da vro distrei ;
Peur e hlebi da dreid en-dro
War drêz melen mor glaz Rosko ?

Kastelfidardo

Kenavezo dit, Breiz-Izel, or bro,
Doaniuz braz eo da zilezel,
Mez evid divenn an Iliz eo
Kaer gouestla he yaouankiz.

I

Ma red or gwad war an dachenn, eun deiz,
Te 'ray evidom eur bedenn ;
Te 'lavaro : « Aotrou Doue,
R'ho-pet truez ouz o Ene. »

Te 'laouennaio, mamm ha tad, ivez,
Te 'zeho dour o daoulagad,
Te 'lavaro : « Na welit ket,
Ho mab 'zo d'an Neñvou pignet. »

II

Bretoned yaouank, o kuitaad, hirio,
Ho ti, ho pro, ho mamm, ho tad,
Bugale vad or Breiz-Izel
Daoust ha c'hwi 'yafe d'ar brezel ?

Mar deom d'ar brezel, hag ez eom, avad,
War galv Doue eo e kerzom ;
Pe ni 'vo treh pe ni trehet
Gand Doue ni 'vo kurunet.

Lamorisier⁶, den a galon, ma zo,
Enor or Breiz, or gwir vignon,
Kerkoulz kristen ha soudard mad
A gerz en ho raog d'ar stourmad.

Fiziañs ha kourach, kenvroiz, eta,
Evid harpa gwir an Iliz.
Diskouezit ez eus c'hoaz, e Breiz,
Tud a galon ha tud a feiz.

Divenn ar gwir a zo bepred, ya, zur,

⁶ Lamorisier : Lamoricière (1806-1865). Jeneral, e vrezelas en Aljeri. A-eneb Napoleon III e oa, hag e oe kaset d'ar hreñvleh Ham. E 1860 e oe jeneral ar Pab ; Trehet e oe gand arme an Itali e Castelfidardo e 1860.

Lodenn an dud eün a spered,
C’hwi hoh-eus c’hoaz gwelloh lodenn :
Ar gwir hag ar feiz da zouten.

Stard a galon, c’hwi a vezo, bepred,
Gand ar gwir roudenn, c’hwi ‘gerzo
Hag e ve deg ouz pep hini...
C’hwi varvo, ma n’hellit ket trehi !

Mar red ho kwad war an dachenn, eun deiz,
Ni ‘ray evidoh eur bedenn ;
Ni ‘laouennaio mamm ha tad,
Ni ‘zeho o daoulagad.

Ha pa dremenint dirazom, goude,
Ni ‘lavar, kenetrezom,
An tad hag ar vamm a dremen
Eo tud ar brezelour kristen.

III

An distro

« Brezelour, din-me livirit, heb gaou,
A be war-zu e tistroit ?
Ha c’hwi ‘zistrote deuz ar vro
Ma’z eus enni brezel garo ? »

« Heb gaou deoh-c’hwi, me ‘lavar, ya da,
A be gostez emañ distro :
Me ‘zo distro deuz ar vro griz
A ra brezel ruz d’an Iliz.

En e zorn savet e gleze, eun deiz,
Or habiten a lavare,
A lavare d’e zoudarded :
« Trehi pe vervel, mignoned ! »

Hanter-kant mil den dirazom, a zo
Nemed unneg ni ne dom !

Aotrou Doue, O ! ni ho ped,
Kennerzit breh ar Vretoned !

IV
Ar hañv

Perag e son kañv ar hleier, hirio,
Ha gwisket e du ar heler ?
Perag ar re fall o c'hoarzin
Hag ar re vad war o daoulin ?

Arme ar Pab 'zo distrujet, siwaz !
Ar re fall o-deus gounezet !
Kouezet eo war dachenn ar Brezel
Bugale yaouank Breiz-Izel.

Pegeid ema ho relegou, pegeid ?
Piou a bedo war ho peziou ?
Êlez an Neñv, c'hwi a zougo
Or pedennou beteg enno.

Mammou, breudeur, ha c'hoarezed, eta
E-leh gouela, pedi 'zo red.
Da heul pedi, meulom Doue !
Kaer ho maro, kaer ho puhe' !

Kouezet int evel ma tle kouezoud, bepred,
Kristenien Breiz, o lavaroud :
« Maro 'vid ar feiz, maro mad !
Dit va buhez, din va brud vad. »

V

Trehet oh bet gand an niver, hepken,
Traiset ouspenn, Breiziz ker,
Kaloneg oh bet er gombat.
Koll 'zo gounid pa stourmer mad.

Ho kwad o redeg d'an douar, du-ze,
A lakaio fin d'or glahar,

Gwad ar verzerien a laka
Bleñchou an Iliz da vleunia.

Kenavo deoh, evid biken ! bremañ,
Oh gourvezet war an dachenn ;
E Breiz, n'hellim mui ho kweled
En Neñvou ne lavaran ket.

Pa welim e korn an oaled, en ti,
Ho skabellig goullo chomet,
Ni 'lavaro mintin ha noz
Kenavo deoh er baradoz.

Al Luskadenn

Va hrouadur, c'hoari 'glaskit,
C'hwi 'po 'nezi mar kendalhit,
Deuet eo ar mare da gousked,
Komañs d'hen ober a zo red.

Setu perag, war va barlenn,
Grit dodoig, va holladenn !
Prennit kloz-kloz ho lagadig,
Dizuj bihan, grit eur houskig.

Yaouankig flamm en em gavit,
Petra 'vezoh-hu mar bevit ?
Gwell e ve deoh-c'hwi, marteze,
Mond abredig david Doue.

Hent ar vuhez 'zo toseneg ;
Ni 'skuill warnañ daelou doureg ;
Nag a bed rannet o halon
'Ve choa ganto mond d'anaon !

Oll joaiou 'r bed 'zo faziuz,
Mesket a galz poaniou mantruz ;
Kalz drein 'zo dindan ar rozenn,
Nebeud a vleuñv war ar spernenn.

Mez da hed, war va barlenn,
Êlig Doue, pennig melen,
Prennit kloz-kloz ho lagadig,
Êlig bleo-aour, grit eur houskig.

Nann, va Doue ! c'hwi hel lezo,
Gand e vamm beteg he maro,
Evid laouennaad he hozni,
Ha pa varvo, gwella warni.

Doaniousa tra evid eur vamm
Koll he hrouadur yaouank-flamm !
Goude m'he-devez her ganet
Ha war boull he halon maget !

Seder, eta war va barlenn,
Mabig tener, va gwir souten,
Prennit kloz-kloz ho lagadig,
Kalon e vamm, grit eur houskig.

Mez kousket oh. O va Doue !
C'hwi 'ray warnañ ho polonte' :
Kement a rit, greet mad e vez
Ra vo 'ta greet ho polontez.

Bale Even

Deom, deom, deom, deom, deom d'ar stourmad !
War-zao ! Breiziz ha dalhom mad :
Pounner on dorn ha stard on troad !
Distruja 'glaskont pep kristen,
Or gwad a ruill e pep tachenn,
Deom, deom ha malom or bourevien !

Or merhedigou keiz gwallet ;
Or bugaligou paour lazet ;
Gwa deoh, maherien villiget !

Pulluhet deom on ilizou ;
Devet, peurlaeret or madou ;
Prim d'or gwareg, d'or goafiou.

Deskomp, hirio, d'ar baianed
Penaos e stourm ar Vretoned,
Kriz a galon, a benn kaled.

Deom oll eta, deom a-strollad :
Maro 'vid ar vro, maro mad ;
Eüruz neb a jomo 'r stourmad !

Deom, deom oll, deom ha deom laouen,
Kaer eo maro eur gwir gristen
A varv 'vid harpa e gredenn.

Deom, en em gannom a-zevri,
I wask or Breiz, Breiziz om-ni,
Breizad, pe varv pe rank trehi.

Tadig-koz, ar brabañser

Matiaz koz, e gorn dindan e fri,
E jod ruziet gand eur bannahig gwin,
A lavare, en eur huanadi :
« O ! me 'zo bet, eun amzer, eur poñsin.

Va bleo melen, ker flour evel al lin
War ar chupenn a ruille rodellet :
Va garr nerzuz a oa turgnet ker fin,
Va daou lagad lemm evel ar stered.

Nann, ne oa ket er seiz parrez nesa
Eur paotr yaouank ker gallouduz ha me,
Ker sonn a gorv, kel ledan a ziou skoa'
Ker brao stummet e-barz en e vale.

Er gourenou, me a winte paotred ;
Ar maout e oan en oll marradegou,
War ar jibier ne vanken tenn ebed
Ar bleo, ar pluñv, oll e ruillent maro.

Den ne ouie evel don c'hoari 'r vaz,
Den ne zamme eur zahad pounnerroh,
Den ne zouge sonnoh ar banniel braz,
Da gas eur marh ne oa den eskuitoh.

'Vel eun eostik me a ouie kana,
'Vel eur hloareg me a ouie rimal.
D'ar merhed yaouank koant, 'oan eur hog da gonta,
Hag en dachenn, dispar evid dañsal.

Er pardonioù, gwechall, pa bourmenen
Gand va mamm-goz, Doue d'he fardono !
E lavare an oll pa vezem o tremen :
Setu aze braoa daou zen ar vro.

Bremañ, siwaz ! bremañ bugaligo'
N'on nemed ar skeud deuz ar pezh on bet.
Ma fenn 'zo moal, ma daoulagad maro,
Ma chouk krommet, ha ma hov-garr teuzet. »

Trede lodenn

Soniou

Matilin an dall

Breiziz va henvroiz karet,
Hirio siwaz me a zo koz,
Hag a bed gwech em-eus sonet
Da zañsal en deiz hag en noz,
Ha mar plij gand Santez Anna
E klevor c'hoaz war an dachenn,
Son skiltruz va bombard velen
O lakaad tud or Breiz da dridal !
Me eo Matilin an dall, ar bombarder laouen
A laka 'n dud da zañsal
Diwar va barrikenn :
Eun taol sut ! ha souden
Paotred skañv d'an abadenn,
Eur bomm sonn, ha raktal,
Paotred o fringal ! ge.

Yaouank e kollis ar gweled...
An eostik, ma lavarer mad,
A gan flourroh en e gaoued
Pa vez dallet e zaoulagad :
An dall, a gêrig Kemperle,
En e lochenn e ribl an dour,
Evel an eostik a zon flour
Etre an Izol hag an Elle.

Yannig-ar-japel, em hichenn,
A hoari gand e viniou,
Dreist-oll pa zun bord e werenn
Evid souplaad e vuzellou.
Nag eñ a sko, Yann va homper,
Gand e zonerezig lirin,
Ha d'e heul, pa sko Matilin,
Eo marz gweled penaoz e fringer.

Bet on e Pariz, eun devez,
O seni dirag ar Roue,
Hag eñ, koulz ha tud e balez,
Gand ar blijadur a hoarze,
A hoarze kreñv, a hoarze pell,
Heb galloud mired da hoarzin,
O kleved an dall Matilin
O tistaga toniou Breiz-Izel.

Malo-Kored a gêr Ahez,
Kenta grenadour a Vro-Hall,
A veritas kleved ivez
Sonerez Matilin an dall.
A-dost, a-bell e tereded,
Da weled patrom ar soudard
Ha da gleved mouez va bombard
O kana enor ar Vretoned.

Kalz all a vije pinvidig
Ha ganen-me ne jom netra
Nemed izign⁷ va bombardig
Da hounid va zammig bara.
Mez a ze pikol forz ne ran ;
Me 'zono keit ha ma vevin
Ha deiz va maro ne gollin
Nemed va bombard ha va diskan.

⁷ izign : ?

Ar Jikolodenn

Eur zulvez, o pourmen,
Hed da hed eur flourenn
Drant ha dibreder
E klaskis eur skabell
Eur goudor d'an avel
War bordig eur ster.

En tu all d'ar sterig
E welis eur plahig
O kutuill bleuniou ;
Ha me chom amguzet
Gand ar c'hoant d'he gweled
Dre douez an deliou.

Ken koantig he haven
Gand he jikolodenn
War he bleo du-pod,
Hag he lagadig glaz,
Sklêr evel ar mor braz,
War drêz gwenn an aod.

P'he-devoa kutuillet
Pep seurt bleuñv marellet,
A-leiz he barlenn,
E skoulmas anezo
War eur brank bezo,
Gand eur vroennenn.

Hag en eur o skoulma
He helven o kana
War ar gurunenn,
Gand eur vouez ker seder,
Ha mouez eun alhweder
Eur zonig laouen.

« Te, va hurunennig,
Em ano d'am dousig,
Te 'lavar :
Ar plah am flañsonas
Da garo warhoaz,
Da garo atao.

Va bleuniou a weñvo
Va hwez a dremeno
'Vel eur bouill moged ;
Mez kalon da vestrez,
Rozenn a garantez,
A vleunio bepred.

Ya, mignonezig tener,
Keit ha ma redo 'r ster,
War-zu ar mor don,
E chomo da ano,
Distlabez ha beo,
Moulet em halon.

Keit ha ma ray brezel
Ar skoul d'an durzunell,
Ar beliz d'an dañvad,
Me 'vago kasoni
'Eneb kement hini
'Ray dit kalonad.

Keit ha ma richano
War he bodig dero
Ar rouzardennig,
Me a gano ivez
Sonig va harantez
War bank va lochig.

Kentoh e vo gwelet
Ar pesk o tilammed,
War an douar leton,
Eged na dremenin,
Heb tridal ha c'hoarzin,
E-biou d'am mignon. »

An ti-soul

Ti-soul garlantezet a hlazvez
Leh ma 'm-eus bet ennañ ar vuhez,
Ar gwel ahanout din a ro
 Levenez,
Ennout va spered a zoñjo
 Atao.

Bemdez, me zoñjo 'n da goulmig wenn,
Ker koant he fluñv, ker seder he fenn,
O hournijal eskuit ha flour
 Dreist al lenn
Pe o para war melezour
 An dour.

Bemdez, me 'zoñje en nozveziou
Ker splann, ken didrouz war ar mêziou
Pa dro 'l loar war bordig he hant,
 En Neñvou,
Evel eur bladenn olifant
 Ker koant.

Bemdez, me 'zoñjo 'n heol mintiniad,
Ker fresk e dal, ker lemm e lagad,
Gand e sklêrijenn berlezet
 Gliz ar prad,
Hag hen war gougoul alaouret
 Douget.

Bemdez, pa'z ay 'n heol da guzed
Me 'zoñjo kerkent el laboused
A gan evel ogroigou⁸
 Benniget,
Lod er gwez, lod war bodennou
 'R hleuziou.

Piou a rento din va lochennig,
Kel laouen war beg he zorgennig,
Ledet iliao 'hed he zoenn
 Ker braoig,

⁸ ogroigou : ograou.

Ha dirazi eur hlazderenn
Raden.

Gand paourentez, me 'oa pinvidig,
Rag ne reen forz pegen nebeudig ;
Va halon a gave bepred,
Em lochig,
Kemend am-eus muia karet
Er bed.

Kaoud a reen eun tad karantezuz,
Eur vamm dener ha madelezuz,
Êr pur, glazder, plijaduriou
Dibehuz,
Heol en hañv, er goañv tantadou
Deliou.

Eüruz 'n neb a vev war ar mêziou,
Pell deuz trouz ha dizurz ar hêriou.
Ma'h anavezfent hed-ha-hed
O madou,
Mez da galz me 'wel o spered
Dallet.

Ar grougadenn

Sao, pign er skeul eta, koz denig,
Koz netraig
Koz truillennig :
N'em-eus aon ebed rag an Ankou,
Rag bourevien,
Rag archerien ; n'em-eus aon ebed rag an Ankou,
Na rag skoulm ar hroug-lasou.

Eur peul a vezo va bezig,
 Va lochennig,
 Va liorzig,
Begig ar vran eo am dispenno ;
Preñv an arched,
N'am zebro ket,
Begig ar vran eo am dispenno
Keit ha me zistribillo.

War va fenn eur volz steredennuz,
 Ken lugernuz,
 Ker peohuz,
Dindan e savo glazderennou,
 Heol a baro,
 Gliz a gouezo,
Dindan e savo glazderennou
Ha bleun e-touez an deliou.

Ha pa luskellot din va havell,
 Avel izel,
 Avel uhel,
Me a vrañsello va relegou
Du-mañ, du-ze,
A bep koste',
Me a vrañsello va relegou
Dizamm a vein ar beziou.

Lez-Ober

Daou archer war beb a varh dibred
A gerze gand ar wenodenn ;
Unan a zoug mañchou arhantet,
Eun all eur gouriz ker melen.
Sada ma lavar ar Brigadier :
« Savet an amzer, eun tammig. »
« Brigadier », a respont Lez-Ober :
« Bridadier, c’hwi ’gomz manifig. »

« Em yaouankiz, me am-eus soñj mad
(Ne zistro mui ar pezh ’zo bet !)
Em-boea eur vestrezig deread,
Leun a zellid, leun a gened ;
Kalon an den, war a lavarer,
A gar cheñch klud aliezig. »
« Brigadier », a respont Lez-Ober,
« Brigadier, c’hwi ’gomz manifig. »

« Eur vicher eo euz an diêsa,
Diwall ervad tra pep hini ;
Pellaad diwar-dro mad an nesa,
Fallagriez ha laeroñsi.
Ha koulskoude, va gwregig tener
A gousk em zi heh-unanig. »
« Brigadier », a respont Lez-Ober,
« Brigadier, c’hwi ’gomz manifig. »

An heol kosteziet, war an dachenn
A oa tostig-tost da guzed.
Ar Brigadier, diwar e dorchenn,
A daol eur zell war bolz ar bed :
« Gwel, » emezañ, « du-hont, pa zeller
An oabl, alaouret ker braoig ! »
« Brigadier », a respont Lez-Ober,
« Brigadier, c’hwi ’gomz manifig. »

« Ar brud mad a zo eur gurunenn,
Blañsonet gand mirt ha lore.
Me ’reas al lez, me ’zougas sabrenn,
Pried on, brigadier ive’,
Hag evel Jazon me a gemer

An dro da zevel uhellohig. »
« Brigadier », a respont Lez-Ober,
« Brigadier, c’hwi ‘gomz manifig. »

Neuze ‘chomont o-daou da zoñjal,
Ne glever ‘hed ar wenodenn,
Nemed ar hezeg o trotal...
Ar Brigadier ne gomze ken. Mez pa houlaou an deiz e klever
Klemmadennou eun huanadig.
« Brigadier, ‘zimeg Lez-Ober,
« Brigadier, c’hwi ‘gomz manifig. »

An daou vaout

« Maout ar Gov ha maout ar Gall
En em dourtas en dezi all.
Hag e lavare ar Gov :
« Sell va maout penaoz e sko ! »
Hag ar Gall a lavare :
« Sell penaoz va hini-me ! »

« Maout, dalh mad », eme ar Gall,
« Maout ar Gov a ya da fall. »
« Maout, dalh mad », eme ar Gov,
« Maout ar Gall dit en em ro. »
Hag an eil ouz egile
An daou zod en em ganne.

« Va maout », a lavar ar Gall,
« A lakay da vaout-te dall. »
« Va maout », a lavar ar Gov,
« Da vaout dit-te a dougno. »
Hag an daou loenig korneg
A laka ar gwad da redeg.

« Alo ! maout, » eme ar Gall,
« Darhaou din eun taolig all. »
« Va maout », a lavare ar Gov,
« Din eun taolig all, darhaou. »
Hag an daou gêz penn-oh-penn
A-daoliou korn en em zispenn.

Dao ! pilet eo maout ar Gall.
« Sao, adarre, koz tra fall. »
Dao ! diskaret maout ar Gov.
« Sao, pe me da doullgovo. »
Hag an daou baour, adarre,
En em bistig a-neve'.

D'ar fin oll, maout ar Gallig
A gouez d'an traoñ, maro-mik.
Ar Gall, dilammet a-fo
A dorr gouzoug maout ar Gov.
Ha setu 'r vrezelourien
O-daou war an douar yen !

« Bremañ, avad, » eme ar Gov,
« Eur c'hoari all a vezo. »
« Serr da veg », eme ar Gall,
« Pe me ray dit kemend-all. »
Hag eterzo o-daou raktal
An taoliou dorn da nijal.

« Pak hemañ », 'lavar ar Gov :
« Daoust ha c'hoaz, maout, te grougo ? »
« Pak hemañ », 'lavar ar Gall,
« Gwel ha me 'hoari da fall. »
Hag evel war eun anne
Va daou zen a bigose.

« Dal a-zaou », eme ar Gov,
« Va maout dit, ker e kousto ! »
« Dal a-zaou », eme ar Gall,
« Paea 'rin va dle d'eun all. »
Hag evel gand morzoliou
En em vloñsont a-daoliou.

Dao ! torret daou zant d'ar Gov,
Ar gwad a red tro-war-dro.
Dao ! flastret e fri d'ar Gall,
Ar gwad a red kemend-all.
Kerig mad eo bet koustet
An daou hloaneg paour lazet.

Jobig ar Rouz, digouezet,
En-deus dezo lavaret :
« Paotred ! chomit didrabas
Pe me ya da hoari 'r vaz.
Groom friko gand ho maouted
Ha bezom oll mignoned. »

An diou vondrask

Diou vondrask a zo en ti
Hag a ra d'an oll avi ;
Eun drugar eo o hleved
O sotal en o haoued.
Unan a zo da Jozon
Hag eben 'zo da Zelton.

Eun devez, hini Jozon
A ziruillas d'an traoñ ;
He morzed a oe torret
Hag e chomas mahagnet.
War-lerh eun heveleb lamm
Eo bet lesanvet "garrgamm".

Eun deiz all hini Selton
On lakeas oll e kaoñ ;
Astennet war he flankenn` »
Oa war-nes rei he hrohenn.
Abaoe 'r seurt aksidant,
N'he galver nemed "droug-sant".

Mez pehini ar wella ?
An dalh a gomañs ama' :
"Garrgamm" eo, hervez Jozon,
"Droug-sant" eo, hervez Selton.
Ha bemdez e sao glabous
Diwar-benn an daou labous.

« Sell eta, sell mad, Selton,
Ouz "Gargamm", » eme Jozon,
« Eun doenn rouz war he chouk
Ha marellet he gozuoug.
Anez m'eo torret he garr
Sur ne gavjed ket he far. »

« Sell kentoh, sell mad, Jozon,
Ouz "Droug-sant" », eme Selton :
« Pegen lemm eo he lagad
Peger skañvig eo a droad ;
Daouzeg all ha da hini
Ne dostafent ket outi. »

« Selaou ! selaou mad, Selton,
Ouz “Droug-sant” », eme Jozon :
« Mouez va hini ‘zo ken drant
Ha mouez eur hlohig arhant ;
He sutadenn ‘a zo ken floir
Ha ma’z eo hiboud an dour. »

« An dra-ze, paour-kêz Jozon,
N’eo netra », eme Selton ;
« Selaou bremañ va hini ;
Houmañ ‘vad a sko warni ;
N’eus ket unan, e Bro-Hall,
Hag a zutfe ker brao all. »

Hag e respontas Jozon,
« Gaou a levez, Selton,
Flourroh e kan va milhwid,
Zoken me lavaro dit
E kollan kalzig amzer
O selaou va ograouer. »

Ha Selton a responte :
« Me ‘goll amzer koulz ha te ;
A-veh ma komañs “Droug-sant”
Dispaka he soniou koant
Ma chom a-zav va fluenn
Sorset gand he hanaouenn. »

An hini a reas ar zon
A roio kentoh rezon
D’an neb en-do ‘r galon vad
Da baea eur voutaillad.
Hag ar bont a vo staget
Evid priz ouz he haoued.

« Me ‘baeo », eme Jozon,
« Me ivez », eme Selton.

Hag e-leh eur voutailad
Setu diou en eur strollad.
Ha peb milhwid ouz he dor
He-deus eur bont a enor.

Ar wreg yaouank o luskellad he mab hena

Pa oan er gêr, e ti ma zad,
Me ne valejen ket war droad.

War droad, me ne valejen ket,
Atao karr pe varh torchennet.

Me 'zouge, neuze, eur boutaou
Ha ne weled ket o zeuliaou.

Ha ne weled ket o zeuliaou,
Goloet ma'z oant a haloñsaou.

A haloñsaou arhant hag aour
Ha me 'zoug bremañ truillou paour !

Me zoñje din, pa zimejen
Taol labour mui ne rajen.

Netar, nemed hervez ma hoant,
Ruilla 'r voul ha dispign arhant.

C'hoari gand ma daou zorn o-daou
Ha torri kraoñ er pardoniaou.

Mez siwaz ! goude labourad
Me 'ro ma chouk da gant bazad !

Red mad din gober gwasoh c'hoaz,
Pilad al lann gand ma zreid noaz.

Tud yaouank paour, pa zimezit
C'hwi ne zoñjit ket petra 'rit.

Ha mond da gredi, ne ra de'
Na gouez an aour a vegou 'r gwe'.

Ne gouez an aour a vegou 'r gwez
Ha padal deliou melen 'vez.

Ha padal deliou melen 'vez
O roi o flas d'ar re nevez.

Tu yaouank, a-barz dimezi
Klozit eul liorz e-tal ho ti.

C'hwi 'lakay enni, beb eil trto,
Goude 'n eured tri bod c'hwero.

Bod neh a-zehou, bod klemm a-gleiz,
Ha bod rangalon en o hreiz.

Tro-war-dro greun pasianted
Ha mond aliez d'o gweled.

D'o दौरa mad, दौर ne vanko,
Euz ho taoulagad e kouezo.

Setu ma zon, bremañ, ma zud,
Hervez ho c'hoant, choazit ho klud.

An amourusted hag an amzer

Eun den koz, anvet an amzer,
Ha bepred o veaji,
Degouezet war bordig eur ster,
En em laka d’huanadi :
« Hag amañ ‘vezin lezet
Hep truez ouz va mizer,
Ha c’hwil hellfe, va mignoned
Chom hep tremen an amzer ? »

En tu all eur bodad merhed,
A lavar an eil d’eben :
« E bagig an amourusted,
Deom-ni, deom d’hen didremen. »
Unan a respont gand furnez :
« Petra ‘z eom-ni da ober ?
En em goll a reer aliez
O klask tremen an amzer. »

An amourusted p’o hlevas,
O fignas en e vagig :
Daou roeñvig flour a gemeras
Evid sturia e lestrig ;
Ehana ‘ra, gwechouigou
En eur gana dibreder :
« Ganen-me, va merhedigou
Eo e tremen an amzer »

Pa oa gwir well’ ar blijadur
An amourusted, treitour,
A daol ar roeñv, a lez ar stur,
Ar vag a ya gand an dour.
Neuze an amzer o roeñvad
A gan : « An amourusted
Ganen d’am zro, c’hwil ‘wel ervad
A dremen, eta, merhed. »

Kervadiou

Aour hag arhant, Mari goant, `
A rent laouen peb den.
Deiz mad deoh, va dousig Mari
Hogan ruz a denn mouilhi.
Aour hag arhant, Mari goant,
A rent laouen peb den.

Kervadiou

Deiz mad deoh, va dousig Mari,
Hogan ruz a denn mouilhi.
Aour hag arhant
Mari goant,
A rent laouen
Peb den

Mari

Moualh zu pa deu, 'h hogan ruz
'Vez gwell dezi, ma vent a-guz.
Morvan, tal koant,
Eo va hoant ;
Heptañ ti aour
'Vez paour.

Kervadiou

Du, kein ar houmoul adarre ;
Daoust piou 'dro 'n avel er giz-se ?
Aour hag....

Mari

Mab e dad eo Kervadiou
Ma n'eo a wenn eo a-liou,
Morvan tal...

Kervadiou

Ha merh he mamm eo Jaketa.
Pa ne sko, e rank flipata.
Aour hag....

Mari

Mamm ar verh, 'hed heh oll vuhez,
A gavas mouar er brankou drez.

Morvan, tal...

Kervadiou

Kervadiou 'oa den a-feson ;
Neb hen dispriz 'zo direzon.
Aour hag...

Mari

Hag e vab 'zo koulz pe welloh.
En noz den hag a ve koantoh.
Morvan, tal...

Kervadiou

N'eo ket teod flour na koantiri
A laka 'r zoubenn da vervi.
Aour hag...

Mari

Gwell eo kalon vad ha tener
Eged arhant leiz ar baner.
Morvan, tal...

Kervadiou

Ya, da frita laou 'r baourentez
War bladenn graz ar garantez
Aour hag...

Mari

Gwell eo bèrou war eun oaled
'Vid, en ti, marh rouz eur pried.
Morvan, tal...

Kervadiou

Kov goullou ha troad diarhen
A vousec'hoarz yud e ti eun den.
Aour hag...

Mari

Da betra boutou lasennet
Evid pourmen kalon rannet ?
Morvan, tal koant
Eo va hoant.

Meuleudi da eur mignon, deiz e ouel.

Goud ober vad ha plijadur,
N'eus netra gwelloh, a-dra-zur
 Nann zur,
N'eus netra gwelloh, a-dra-zur

Vad a rez, plijadur ive'
Da biou ar maout nemed dit-te ;
 E ve ?
Da biou ar maout nemed dit-te ?

Gwiska 'rez kristenien Jezuz,
Gand mezer tomm, merzer nerzuz,
 Paduz
Gand mezer tomm, merzer nerzuz.

Ha da wriad o gwiskamant
Da nadoz a gav neud arhant,
 Ker koant !
Da nadoz a gav neud arhant.

O gwiska 'rez ha d'o maga
Den koulz ha te ne ro bara.
 Nann da.
Den koulz ha te ne ro bara.

Goud leda mél war bara gwenn
A zo gounid ar gurunenn,
 A-grenn,
A zo gounid ar gurunenn.

War bara gwenn an Aviel
Te a léd ker flour eun tammél
 Santel
Te a léd ker flour eun tammél.

Ma lavar kement a zelaou :
Biskoaz ne glevjom ker kaer traou,
 Heb gaou,
Biskoaz ne glevjom ker kaer traou.

Gra vad, gra plijadur, bepred

Hag e kavi 'r gwir eürusted,
Va hred,
Hag e kavi 'r gwir eürusted.

Meuleudi 'n dud, bennoz Doue
Hag ar baradoz d'az Ene,
Goude,
Hag ar baradoz d'az Ene.

Setu aze da gurunenn,
Piou a gavo gwelloh lodenn,
Biken ?
Piou a gavo gwelloh lodenn ?

En Neñvou, Doue da baeo
Hag oll, e Breiz, ni da veulo,
Atao,
Hag oll, e Breiz, ni da veulo.

Lonk e zizun

Jerom an Teo, me 'zo lesanvet,
A-raog an dour me 'lammfe en tan ;
Noz-deiz em dorn eur werenn garget,
Va barrikenn a horoan ;
 En eur lipad va mourrou,
 Eva a-leiz va genou
 Banneou
 La da, la da,
 Setu petra 'ra
Oll blijadur Jeromou.

Er skolachou, ne zeskis takenn ;
Ar studi ne dalv ket ar boan.
Latin, gregach, istor ha fablenn
Ne rontaont eur hov moan.
 Mestrez an oll skiantchou,
 Eo, sevel heb arwechou⁹
 Banneou.
 La da, la da,
 Setu petra 'ra,
Oll ouziegez Jeromou.

Prezeger, en da gador, gouizieg
Te 'gaoze flour, te barlant mad ;
Ouz da gleved, an ezen gorneg
A zigor frank o daoulagad.
 Dalh ganez da zermoniou,
 Ne hlebiont tamm va genou.
 Banneou.
 La da, la da,
 Setu petra 'ra,
Deskadurez Jeromou.

Ouz taol, en eur leina, dibreder,
Kaoud lamm klok digand e werenn ;
Er hao da furchal pa ziskenner
Gweled seh-korn pep barrikenn ;
 E-leh suna boutaillou
 Goulenn digand ar puñsou

⁹ arwechou : ? Marteze « gwech ebed ».

Banneou !
La da, la da,
Setu petra 'ra,
Oll dizesper Jeromou.

Gwella 'zo, diouz madou 'r bed-ma'
Va halon a zo distag-mad ;
Teuzi va oll danvez heb gina,
Koueza paour heb gouela berad.
Gwerza tok, gwele, boutou,
Evid kaoud, a-govajou
Banneou !
La da, la da,
Setu petra 'ra,
Brasa vertuz Jeromou.

Pa vo peurzibunet va hudenn,
Ha me rankoud lammed er baill,
Ne glaksin na kroaz na medalenn
Me 'gas ganen eur voutaill ;
Gelloud, e-leh pateriou
Kana war chouk an Ankou
Banneou !
La da, la da,
Setu petra 'ra,
Oll hoantegez Jeromou.

AZOR

Eun tamm ki er vro-mañ
A reer Azor anezañ,
Eur hi fin eo hervez lod
Mad da hoapaad ar chas sod,
Hervez an oll eo treitour
Ha trubard evel an dour

Ma n'hen anavezit ket
Setu amañ e boltred :
N'eo ket eun dra didalvoud
Dond a-benn d'hen anavoud.
Selaouit eta, 'n istor
Evid anavoud Azor.

Ni 'rankfe diskenn izel
Da vond beteg e gavell.
Diskenn a dle, koulskoude,
Diwar daou gi arh Noe,
Mez abaoe pell a zo,
An daou-ze a zo maro.

Kenta ma kaver ano
Euz a ouenn Azor er vro,
Eo en eun tamm kanaouenn
Bet savet e Lezneven.
Skrid eur goz amiegez
Eo a zesk deom e lignez.

Beteg neuze, tud Azor
A zo debret o istor :

Kredi 'heller, koulskoude,
Ez oant paotred a-zoare.
Mez kontell gamm an amzer
A zibennas o haier.

Mar dleom kredi ar zon
Ar ouenn a zeu a Roazon.
Eur hoz marhadour kezeg
A lezas eur hi truilleg
Evid paea e skodenn
Eun devez e Lezneven.

“Truill” e oe anvet ar hi
Gand plah an ostaleri,
Abalamour d’e vlevenn¹⁰,
Pouloudennet diskempenn
Ha d’e zaoulagad pikouz,
D’e fri togn ha d’e lost rouz.

Rag ma laere ar stripou
Ha ma’z oa louz e vourrou,
E voue lesanvet ouspenn
“Truill” lipouz, truill anduillenn,
Truill gamm, truill ar stripaouaer¹¹,
Truill bigoveg ha truill laer.

A-wechou, war a gonter,
Da ziverrad e amzer,
Truill a ree troiou bale ;
Ha setu e pe zoare
En em skignas dre ar vro
Chas gloaneg rouz o baro.

Azor 'zo bet marteze
Strobet eun deiz evel-se.
Ar pezh 'zo sur, an oll dud,
A ziskred hervez ar vrud

¹⁰ d’e vlevenn : d’e vleo.

¹¹ stripaouaer : striper.

Eo diwar eur giez rouz
Ha diwar eur hi pikouz.

Evidon-me, n'ouzon ket
Gand pe dud eo bet ganet ;
Rag pa zellan piz outañ,
Me 'gav gouenn peb loen ennañ
Ha n'hellan, e gwirionez,
Anavoud mad e lignez.

Pa zellan ouz e ziou voh
E tenn diwar eur pemoh ;
Pa zellan ouz e skouarn
E tenn diwar al louarn ;
Ha pa zellan ouz e dal
E tenn diwar ar chakal.

E jilpadenn 'zo raouliet
Evel son eur hloh faoutet ;
E lagad a zo a-dreuz
Evel genou eur vengleuz ;
Ha rampet e zivesker
Evel gaol eur hemener.

Bale 'gar d'ar piltrotig
Evel eul logodennig ;
Puched aliez a ra
War e lost da ziskuiza,
Pe da gonta koñchennou
D'ar chas a gred e gomzou.

War a glevan, ez eo mad,
Da ziloj lapin ha gad.
Gand e fri lemm ha tano
E furch kement toull a zo ;
Setu perag, a-wechou,
E vez leun gaillar e henou.

Mez en labouro, morse,

Nemed gand chas a-zoare.
Bezit ki dioh e douchenn
Pe chomit en ho lochenn ;
Mond d'hoh heul, evid Azor
A ve re vraz dizenor.

Mez pa gav e vignoned,
Taolit evez, konikled,
C'hwi 'vo kelhiet, tro-war-dro,
Gand oll Azored ar vro.
Pa chilp Azor e chilpint.
Pa red Azor e redint.

Ha pa glevot, evel-se,
Harzal forz, a bep koste',
C'hwi 'vo tentet da gredi
Eo peurgollet ar c'hoari ;
Ha koulskoude, mar karit,
Gand eun netra 'kasot kuit.

Azor a zo eur hi yud.
Heb harzal e krog en dud ;
Evel an naer-wiber,
A flemm dindan ar glaster,
Ne gaver trés e roudou
Nemed war-lerh e skilfou.

Mar em hredit, ouz Azor
E talhot prennet ho tor ;
Ha pa rankot mond en hent
Taolit evez ouz e zent,
Ha mar tosta ar hanfard
War e gein pigosit stard.

Evelkent, ar gwella toud
Evid e gas en e roud,
Eo, war digarez c'hoari,
Krañchad outañ war e fri,
Pe kinnig beg ar votez
Da riboul ar patatez¹².

¹² Da riboul ar patatez : da vond kuit ar buanna posubl.

Alanig al louarn

Diskan

Beh d'Alanig
Tan d'ar peiller¹³ ;
Beh d'Alanig,
Tan d'ar muntret !

Kleo, chaseer,
Ar horn sklinton
Penn-da-benn kêr
A zon lirin.

An heol melen
A-dre ar mene'
A strink, laouen,
'Trezeg an Neñv.

Ar hlizenn, drant,
He-deus skuillet
Boulou arhant
War an havreg.

Sao, goustadig,
Ouz da wele,
Lez Margodig
'Kreiz he huñvre.

Prim war da skoa'
Da fuzuill vad,
A-raog, brema',
War-zu ar hoad.

Flambo¹⁴ ! tono !¹⁵
Gwaskom, paotred,
Alan fino
'Zo diskampet.

¹³ d'ar peiller : d'ar skraper.

¹⁴ Flambo ! : flambez !

¹⁵ tono ! : ?

'Vel eul lapous,
'Verl eur vouled¹⁶,
Al loenig rouz,
A red, a red.

'Dreuz ar girzier,
'Dreuz al lannou,
Alanig laer
A ra troiou.

E jilpadenn
Stank ha raouliet
'Hed an draonienn
A gorn bepred.

Mez ar hanfard
En-deus luziet
Ar gudenn, stard,
Ha 'n em laeret.

Pañ ! Pañ ! daou denn !
O ! reuz garo !
War an dachenn
E ruill, maro.

Ar chas, kerkent,
Peurgounnaret,
A-daoliou dent
'Deus eñ brevet.

¹⁶ eur vouled : eur vouled kanon.

Ar pemoh

War va fe', me 'lavar deoh,
N'e' ket brao beza pemoh.
N'eus ket planedenn grisoh,
Eged hini ar pemoh.
Barnet eo war an douar,
D'an enkreiz ha d'ar glahar.

Gand an dud oll eo disprizet.
Gand ar chas eo diframmet.
Nag en tiez, na war ar mêz
Ne houzañver al loen kêz.

Stlejet 'vez d'ar marhajo'
Dre an dommder, dre ar glao ;
Diskaret gand ar selelr,
Divahagnet gand bizier.

Meur a bobl 'deus hen laket
E renk louz ar markenned¹⁷,
Hag an ano a borhell
A zo eun iñsult¹⁸ marvel.

« Pemoh » , a lar Madalen
Da Yann, leun a jigodenn ;
« Pemoh », a lavar ar paour,
D'an dostenn karget a aour.

Red eo dit, paour-kêz porhell,
Dougen ha sparl ha minell,
Gouzañv kontell ar spazer
Da hedal hini al lazer.

¹⁷ ar markenned : ?

¹⁸ iñsult : kunujenn.

Mouzerez Schamdachemda

Schamdachemda¹⁹ 'zo mouzet

Perag ? Me ne...

Perag ? Me ne...

Schamdachemda 'zo mouzet.

Perag ? Me ne ouzon ket.

Diskan

Taol mein ouz an dud

A zo c'hoari,

A zo c'hoari,

Taol mein ouz an dud

A zo c'hoari yud.

Eur bod spern 'zo war e dal,

Ha beg e fri,

Ha beg e fri,

Eur bod spern 'zo war e dal,

Ha beg e fri 'zo teñval.

Diskan all

Sacha war ar bleo

N'eo ket c'hoari,

N'eo ket c'hoari,

Sacha war ar bleo

N'eo ket c'hoari eo.

Tan ha luhed a vezo,

Ha kurunou,

Ha kurunou,

Tan ha luhed a vezo,

Ha kurunou a strako.

Diskan : Taol mein...

Va zud, diwallit ho penn,

Ha plegit mad,

Ha plegit mad,

¹⁹ Schamdachemda : ano eur plah. Pehini (?)

Va zud, diwallit ho penn,
Ha plegit mad ho touchenn²⁰.

Schamdachemda, livirit,
Pe 'vid abeg ?
Pe 'vid abeg ?
Schamdachemda, livirit,
Pe 'vid abeg e vouzit ?

Mouzet a-grenn pa vezit,
Drolig oll en...,
Drolig oll en...,
Mouzet a-grenn pa vezit.

Mar doh eun den a spered,
Perag 'ta mond ?
Perag 'ta mond ?
Mar doh eun den a spered,
Perag 'ta mond da vouzed ?

Koaniit gand eun tamm yod kerh,
Ha c'hwi 'zivou...,
Ha c'hwi 'zivou...,
Koaniit gand eun tamm yod kerh,
Ha c'hwi 'zivouzo war-lerh.

Pa grog ar c'hoant mouz'²¹ ennoh
Ni 'zañs en eur...,
Ni 'zañs en eur...,
Pa grog ar c'hoant mouz' ennoh
Ni 'zañs en eur gana deoh.

²⁰ ho touchenn : ?

²¹ mouz' : mouza.

Ar mezverezed

Ar hiz eo, e n'out²² ped parrez,
E-touez lod merhed,
Da vond d'an davarn, bep sulvez,
Koulz ha lod gwazed.

Gand ar vez ! merhed dispar,
Gwiskit eur bragou,
Evid pa druillo ar harr
Kuzed ho peñsou.

Marh a zoug re bounner sahad
A blego dindan ;
Merh a gar dougen chopinad
En em gavo gwan.

Ar chistr a gouez en divesker,
Hag an treid a vank ;
Braoa tra gweled va homer
O ruilla er fank.

Klskom eru zah ha dastumom
Ar hoz anduillenn,
Chom a ranko ma n'he dougom
E-kreiz ar vouillenn.

Lod plahed yaouank, a zo kaerroh,
A ya d'ar hafe ;
Ar gwin-ardant, mar plij ganeoh
A deu goude-ze.

Perag etre darn priedou
E fuill ar gudenn ?
Ar wreg goude re gorvadou
A dorr he neudenn.

Avalou pud, hirio, a weler
E meur a wezenn !
An davarn e-leh an Aoter

²² n'out : n'ouzout.

Eo a ra 'r hrefen !

Setu ma zon ! Gwelit, merhed,
Ar gwir a lavar,
Darn ahanoh, me a ziskred,
A jomo bouzar.

Kaer ho-po, merhedigou,
Evid brao n'e' ket
Mond a-ruill gand an hentchou
Heb bragou ebed.

Pevare lodenn

Fablennou

Ar goabrenn zu

Eur wech bennag ho-peus-c'hwi gwelet,
Eul lestrig paour, hep stur, o vond taol war zistaol,
Dare gand ar barrou da oueledi bep taol...
Allaz ! Allaz ! setu aze ar bed !

Estlamm ! Dija dindan on treid
An douar o vervi !
Hag ezomm 've 'ta keit,
Dezañ oll da zevi ?
Estlamm ! Etlamm ! Ma fiñv hepken ho preh,
Aotrou, ma fiñv hepken, dioustu
Grit anezañ eur bern ludu
'Vel eur wrahell zeh !

O ! m'her goulenn : An dud, gwechall, amzer Noe
Petra 'oant-i falloh ma'z eo deut, koulskoude,
D'o zamalloud eun dour-bil diroll ?
Ha Sodom, ha Gomor, petra o-doa-i greet
Na muioh na gwasoh evid beza lakaet
Ken didruez gand tan an Neñv, tan oll ?

Estlamm ! Stenn, va herdin, Gwennhlan
Stenn anezo, stenn c'hoaz !
Er bed oll 'krog an tan
Hag eñ war wasoh-waz !

Estlamm ! Estlamm ! krenit, O ! peherien,
Bruzunit ho kalon ! pred eo !
Skuillit daelou ha grit afo
Pinijenn, pinijenn.

Ya, ludit ho tal ! A ! pred eo, me 'lavar,
Pred eo euz a-vremañ 'n em strinka gand glahar,
D'an daoulin ! Deut tro Doue pelloh !
Gand eur barr o c'hweza e weler euz ar gwez

An deliou seh ha glaz o koueza en eun diwez²³.
'Vel-se, prestig e c'hoarvezo ganeoh !

Estlamm ! Na sujed na Roue
Na paotr na merh ne ra :
Dindan gwalenn Doue,
'Om oll hevelb tra !
Estlamm ! Estlamm ! Krenit, O ! peherien !
Bruzunit eta ho kalon !
Skuillit daelou ! 'vid ho pardon
Pinijenn, pinijenn !

Allaz ! petra 'dalv din ? Kalon ar beherien
'Zo kaled evel dir : evel skorn ez eo yen !
Ouz va hleved-me ne ra van !
O ! ne ra van ebed ! Kousket mik eo, evel
Eur horv maro er bez ! Koulz eo din-me tevel !
Kleo 'ta, mignon, kleo, te, va gouelvan !

O ! ne oar nemed hirvoudi,
Ar Barzig paour er velkoni,
Ne oar nemed hirvoudi ken,
Ar Barzig kêz gand an anken.

Kañv d'ar bed oll ! A ! kañv dezañ gand e zanvez,
Kañv dezañ gand e aour, e arhant, e berlez,
Gand kement vad a zo en e greiz ;
Kañv dezañ, me 'lavar, d'e binvidegeziou,
D'e veuleudi, d'e lorh, d'e oll follenteziou !
Kañv ivez ! kañv deom-ni oll, tudou keiz.

O ! ne oar nemed hirvoudi,
Ar Barzig paour, er velkoni,
Ne oar nemed hirvoudi ken,
Ar Barzig kêz, gand an anken.

²³ en eun diwez : 'benn ar fin (?)

Hirvoudou an Tad santel

War don ar Jikolodenn

Ma 'm-eus-me kalonad
Ken a welan, noz-pad,
N'e' ket eston !
Ma ouelan-me beb noz,
Allaz ! c'hwi eo 'zo kaoz
Tud hep kalon.

Gand an droug-speredou
Dre hent an torfedou
Ez oh douget ;
Ya, c'hwi, ha pep kammad,
C'hwi 'ra va halonad
Ouz ho kweled !

Perag 'ta, poblou keiz,
'Teuit-hu ken direiz
Da gounnari,
O tougen ar brezel
'Eneb ho Tad Santel,
D'e hlahari ?

N'on mui mad evidoh ;
Eun all 'gavit gwelloh,
O ! dallentez !
Hag e klaskit diskar
Va zronig d'an douar !
O ! fallentez.

Hag e klaskit diskar
Va zronig d'an douar.
Me ho Roue,
'Vid e rei da eun all,
N'en-deus gwir, an den fall,
Digand Doue.

Peseurt droug 'ta pelloh,
Me her goulenn ouzoh,
'M-eus-me greet ?

Na deoh-hu, na da zen,
Ma ez on en anken,
Kern lakaet ?

O ! me a hell toued,
Re vad eo ez on bet
En ho keñver !
Petra eo a glasken
Nemed ho mad hepken
E peb amzer ?

Ho mad eo a glasken
Ha c'hwi 'ro din anken,
Bugale geiz !
A ! na rit ket d'ho tad,
Mervel gand kalonad,
A-raog an deiz !

Ma 'm-eus-me kalonad,
Ken a ouelan, dalhmad,
Ouz treid ar Groaz ;
Ma ouelan, deiz ha noz,
Ha mar de' gwir oh kaoz,
Selaouit c'hoaz.

Ne reer ket a vrezel
D'ar Pab, an Tad Santel !
Piou bennag 've,
'Ve an dud fall her gra,
O-deus bepred eun dra :
Keuz da houde.

Ne reer ket a vrezel
D'ar Pab, an Tad Santel,
Na da Zoue ;
'Vid gwir hel lavaran
Neb her gra da unan
'Ra d'egile.

Mar de' c'hwi 'ta 've fur
E kredfeh, a-dra-zur,

Da bez 'zo bet,
C'hoarvezet e peb amzer,
Gand pennou ar gounner²⁴
E-barz ar bed.

Va hurunenn 'zo sakr ;
Gwalleur d'ar re fallagr
 'Glask he filad !
Va zronig 'zo dister,
Gwir eo ; e peb amzer
 Koulskoude e pad.

Doue 'n-deus e-uann
'N em garget anezañ,
 E-barz an Neñv ;
Keit ma pado ar bed
E vo gantañ skoret
 Va zronig mên.

Evez 'ta, bugale,
Na zeufe dizale,
 D'ho tiarbenn !
An Doue a wallit
Rag pa sko, diwallit,
 E sko a-grenn !

Netra 'zo ken pounner
'Vel e vreh e kounner ²⁵!
 Pa ya en-dro,
Kemm evid den ebed
Roue 'vel pep sujed,
 A gav distro.

Pardon, O ! va Doue,
Pardon d'am bugale !

²⁴ ar gounner : ar gounnar.

²⁵ kounner : kounnar.

Ma rank unan,
Pignad war ar Halver
'Vel gwechall or Zalver,
Emaon amañ.

Respont da hirvoudou 'r Barz

Hirvoudou eur paour kêz fumer²⁶

Deiz interamant e gorn-butun

Perag, emañ er bed, evel eun estrañjour ?

Perag, ez on ker glaharet ?

Perag ez eo va fenn pleget,

Evel eur vleuvennig pa vank dezi an doru ?

Perag, en eur zelled ouz gwagou²⁷ ar mor don,

Gwechall va brasa levenez,

E santan an dristidigez,

Evel eur mên milin, o samma va halon ?

Perag, en eur zelled ouz koumoul an Neñvou

Douget skañv war o diouaskell

Pe rodellet gand an avel,

E kavan va Ene leun-barr a hirvoudou ?

Perag, en eur zelled ouz va lochenn valan,

Kuzet dindan an iliavenn,

Evel eun neiz en eur vojenn,

Ne zantan, mui, hirio, nemed neh ha gouelvan ?

Perag, en eur gleved kanaouenn ar voh-ruz,

War skourr horjelluz ar wezenn,

Pe gleuz alaouret ar flourenn,

Ne gouez diwar va zeod, nemed klemmou mantruz ?

Perag, va-unan-penn, e bordig an dour-red,

Pa zelaouan hiboud ar ster,

E-leh soñjezonou seder,

Eo eur vantell a gañv a holo va spered ?

Perag, en eur glevoud krozmol an avelioui,

²⁶ fumer : butuner.

²⁷ gwagou : gwagennou.

O lammad dreist al lann garo,
Pe o tourtal ar gwez-dero,
E chom va daoulagad beuzet oll a zaelou ?

Perag, en eur glevoud son kleier va farrez
O tregerni drant ha laouen,
A gorn da gorn, 'hed an dachenn,
E kren va izili dindan beh an enkrez ?

Perag ?... Hirio, siwaz, eur blanedenn galed
He-deus bruzunet va halon,
En eur derri garr va mignon,
Va horn, va hornig paour, setu eñ archedet !

Te yoa, va mignon mad, kulotet²⁸ ker braoig
Ma'z oa eun drugar da weled !
An oll a ranke lavared :
« Nann, nann, n'eus ket e bar war douar an Arvorig. »

Da loja ahanout, gand eun tamm beuz melen,
E ris eur hlaouier heb e bar,
Kelhou arhant en-dro d'e harr,
Hag eur galonig aour o kuruni²⁹ e benn.

Pa welen euz da gern, ar moged o sevel
Hag oh ober koumoul loued,
Evel ezañs an Oferenn-bred,
Da nijal war-zu 'n Neñv, me 'gave diouaskell.

Pa veze du va fenn, pe deñval va spered,
Me 'laka e warnout eun tamm tan,
Pep tristidigez ker buan,
En em deuze, en êr, evel eur bouill moged.

Oll fumerien ar vro, deuit d'an interamant,
Hag e-leh peb a houlaouenn,
Ho-pezo peb a zegalenn,
Stardet, gand eur helh aour, en eun troad olifant.

²⁸ kulotet : kramennent.

²⁹ kuruni : kurunenni.

Hirvoudou ar barz er bloaz 1860

Diwar lein ar Menezioù Du,
Gwennhlan, a daol e skrij d'an avel,
'Vid ma vo kaset a bep tu
Da skuilla er vro eur spont marvel.
(*Ar Barz, gand eun Tregeriad*).

I

Pa vez laouen ar Barz, e oar diou e gerdin
Distaga 'vel ma kar, soniou sklêr ha lirin ;
Allaz ! pa zeu ar gwall anken
Da waska e galon, da rehi e spered,
N'eus forz dezañ neuze pe don da gemered
Ne oar nemed hirvoudi ken !

O ! ne oar nemed hirvoudi,
Ar Barzig paour er velkoni ;
Ne oar nemed hirvoudi ken,
Ar Barzig kêz gand an anken !

Te, va mignon, te 'zo atao drant ha laouen
Hag eun dudi bepred kleved da ganaouenn,
Pa hoari da goantennig aour,
Te 'zo lemm da zoniou, n'eus forz petra 'ganez
Distag da hourlañchenn ha nêt-kaer da vouez,
N'eo ket evel dout ar barz paour !

O ! ne oar nemed hirvoudi,
Ar Barzig paour er velkoni,
Ne oar nemed hirvoudi ken,
Ar Barzig kêz gand an anken.

Perag 'ta n'on ket me heñvel ouzit, ma breur ?
Perag e rankan-me skuilla daelou, beb eur,
Adal ma vez tarzet an deiz
Dreist penn aour ar menez beteg ma teu, en noz,
Va daoualgad re skuiz da zerra pounner-gloz,
En eur gwele 'vez ket dileiz³⁰ ?

³⁰ dileiz : ha n'eo ket leiz (?)

O ! ne oar nemed hirvoudi,
Ar Barzig paour er velkoni,
Ne oar nemed hirvoudi ken,
Ar Barzig kêz gand an anken.

Eur beh a zo warnon, n'hellan mui dioh va hoant,
Allaz ; raouli a ran ha va zelennig koant
A gouez dinerz euz va daouarn !
Petra 'fell dit 'ta c'hoaz e kanfe ar Barz paour ?
E anken ? mad neuze, e-leh eun delenn aour
Ro din unan zir pe houarn !

O ! ne oar nemed hirvoudi,
Ar Barzig paour er velkoni,
Ne oar nemed hirvoudi ken,
Ar Barzig kêz gand an anken.

Kaer em-beus, siwaz ! pedi, aspedi 'n Neñv,
Nemed krena 'ran oll gand an nerz euz va leñv !
Ne ouzon nemed seni kaoñ³¹,
Heñvel ouz ar gaouenn a vez klevet en noz
En eur gleuzenn bennag e-tal eur garnel goz
O tiskana gand an anaon !

O ! ne oar nemed hirvoudi,
Ar Barzig paour er velkoni,
Ne oar nemed hirvoudi ken,
Ar Barzig kêz gand an anken.

Deus, Barz koz Menez-Bre, Gwennhlan, O ! barz dispar,
Deus da rei skoazell din ! Ro mouez d'am glahar !
Stenn va herdin ! stenn ha stenn c'hoaz !
Stenn anezo stard ! O ! te her gree gwechall,
Pa bignes war lein Menez-Bre da grial d'an tangwall !...
Evel dout, gra din beza gwaz.

O ! ne oar nemed hirvoudi,
Ar Barzig paour er velkoni,
Ne oar nemed hirvoudi ken,
Ar Barzig kêz gand an anken.

II

³¹ kaoñ : kañv.

Gwalh va halon, hirio, mar em-beus-me glahar,
Anken gwalh va ene, 'ouzon perag heb mar :
 Sell eta, mignon, sell ar bed-mañ !
Ha gwelet e-peus-te, biskoaz, netra ken trist ?
Euz a buñs an Ivern 'tilamm an Antrekrist
 Loen gouez dislonket gand Staan !

Estlamm ! Ema war-zao, gantañ
Banniel lu ar pehed,
Gand lizerennou tan
Bep tu warni skrivet :
Estlamm ! Estlamm ! D'ar fall Enor ha stad !
 Mez d'ar Groaz ha brezel d'ar feiz !
 Youhal a ra evel eur bleiz
 A houlenn kig ha gwad.

Leun eo, 'leiz e grohenn, a bep seurt drougiez ,
Ne strink diouz e veg louz, nemed fallagriez ;
Diwar gein an avel, ar viltañs,
 Gand e vanniel sao-sonn, oh ober tro ar bed
A zil dre gement leh e vilim milliget ;
Diwall outañ a vez eur gwall daol-chañs !

Estlamm ! An droug e-leh ar mad,
E-leh reiz, direizded,
Dreog, ha leun pep parkad,
O sevel e-leh ed !
Estlamm ! Estlamm ! N'eus ken war an douar,
 Nemed poblou fallagr ha foll,
 O vond bemdez gand an diroll
 War-lerh boued ar gounnar !

Peleh 'ta, O ! Aotrou, ema bremañ ho toujañs ?
Piou a gren, o soñjal eo c'hwi Doue 'r vañjañs
 Ha pa girit, 'ouzoh diarbenn ?
Allaz ! Disprizet oh gand pep unan 'r bed ;
E mestr, war bep kalon, e ren an droug-speerd !
 Den n'e-deus aon ; an oll ho tae a-grenn !

Estlamm ! Bez' o-desu lavaret :
« Pred eo diskar Doue,
Petr' on-dez da weled
En tu-hont d'ar vuhe' ? »

Estlamm ! Estlamm ! Baradoz hag ivern !
Taget int gand tad koz ar gaou.
Evel e kemend a draou
N'ouzont pe³² da espern.

War gement a zo sakr en em daolont gwasa !
Dre o dorn lik, e ruill war an dachenn dija,
Gwad ar verzerien evel gwechall !
An Tad Santel, mantret, a wel ouz treid ar groaz !
An Iliz oll e kañv ! peb gwir gristen e glaz
Arzao pelloh ! Pred eo ! arzao, bed fall !

Estlamm ! E-kreiz an oabl teñval
E strad ar mor gouez,
Me 'gleo Doue o krozal,
Spontuz-braz e vouez !
Estlamm ! Estlamm ! « Pa welot, emezañ,
Ar pehed e peb leh o tron,
Ha mouget ar feiz e pep kalon,
Neuze 'r bed, gwa dezañ ! »

*

**

Ma ve me em-bije, a-berz an Neñv, kelou
Da vond der ar bed-mañ gand ludu ha daelou,
Evel ar Profed santel Jonas !
Me ve me em-bije mouez ar moriou don
Mouez ar gurun foll da vantri pep kalon
O ! didammal ! me lakfe an oll feaz³³.

Estlamm ! Me a lavarje krenn :
« Lakit evez, breudeur,
Setu a-zioh ho penn
Peb reuz, ha peb gwalleur !
Estlamm ! Estlamm ! Doue a zeu da skuiza

³² pe : pere.

³³ feaz : fêz (evdi ar rim). Ober a ra aliez Kere gand stummou Bro-Leon.

Gand or pehedou, O ! siwaz !
Piou 'oar petra 'deuio, warhoaz
Ar bed-mañ da veza ?

*

● *

Marteze 'kreiz ar stourm, diroll an avelioui,
Koeñv er mor, tan en Neñv, ha strakl er houmoulou.

Al leon hag al loen korneg

Eur mintinvez, eul loen korneg
O redeg a-dreuz al lanneg,
A bistigas kostou eul leon.
Hemañ 'gav eun dra difeson
Beza toullgovet er hiz-se.
« Penaoz, emezañ, ha n'on-me ket Roue ?
Ni welo hag hiviziken
E chomo c'hoaz en or hichenn,
Korn ha beskorn ? Rag mar chom,
Ar zoubenn a vezo tomm.
Ni 'raio³⁴ dezañ e varo.
Or hredet an neb a garo ! »
Ar had pa glevas ar helou
A zavas flêr en he bragou.
« Kenavezo, va hamarad, »
A lavar-hi da eun houad
A loje 'tal he-hichenn.
« Mond a ran : n'en em weli mui ken ! »
« Ha perag, eme an houad,
Mond, evel-se, da haloupad ?
Korn ebed n'eus war ho tal,
Piou a gredfe klask ho trouzal ? »
« Kenderv Yann, ha va diousskouarn
Keit ha daou viz eur forh houarn ?
Evid kerniel 'vint kemeret,
Hag en berr me a ve flemmet.
Pa glasker noazoud d'an hentez
E kaver mad peb digarez. »

Me a zoñj din, evid eur had,
Al loenig rouz a gomze mad.

³⁴ raio : roio. E meur a leh e vez implijet "ober" e leh "rei".

Marharid ar herh neiz³⁵

Ken dibreder ha tra, o vond n'ouzon pe du,
Marharid gouzoug-hir³⁶, gand he fenn baz-dotu,
Keit he diou firitell ha daou bao eun alar,
A bourmene war he diou harr,
Penn-da-benn gand bordig eur ster.
Pesked a bep seurt ment, a bep seurt gobari,
A zo a-strolladou, war an dour o c'hoari,
Evid paka 'nezo n'he-doa ken da ober
Nemed astenn he beg braz
Hag o zenna euz ar waz.

« Gortozom, eme Varharid, ken n'am-bezo naon.

Evid fenoz n'em-beus ket aon
Da vond d'am hlud hep tamm koan.
Heb kemered kalzig poan,
Me 'bako pesked pa garin,
Hag ar seurt a blijo din,
Na mui na mêz. » An noz a zeu
Ha Marharid digeri 'r jeu.
Mez ar pesked ar re wella
N'edont mui e tibourbella³⁷.
Siliou munud ha netra ken
A wel chomet c'hoaz da bourmen.
« Petra ? Doubleviou !³⁸
Me, debri siliou !
Ne zebrom kentoh tamm, diohtu
Ni hen tou, war baz Sant Dodu ! »
Etre daou, an naon a gresk
Ha Marharid ne gav tamm pesk.
Eüruz e oe a-barz ar fin
Da lakaad a-dreuz en he skin
Eur velhodenn
Netra ken.

Beg re figuz, peurliesä,
A rank kaoud mad ar pe falla.

³⁵ ar herh neiz : ?

³⁶ Marharid gouzoug-hir : lesano ar gerheiz e Bro-Leon.

³⁷ e tibourbella : dibourbella : (?)

³⁸ Doubleviou ! : ?

An azen hag ar hi

Red eo en em zikour : setu lezenn ar bed.

An azen koulskoude n'hen greas ket, eun devez,
P'evrid petra e vankas ? Her gozuoud 'zo diêz,

Rag evidon-me, a gred

En despet d'ar homzou goapauz

Eo azen loen truezuz.

Mond a ra da Landi, goustad ha dibreder,

Skoaz-oh-skoaz gand eur hi kiger,

En eur zougen, war e gein,

E vestr, Jezrom a Gêrzrein.

E-kcihenn Lambader da ober eur vorenn

Jerom a fell dezañ diskenn.

Kerkent an azen da beuri

A-zevri.

Gwir eo, an askol a vank,

Ar melchen avad 'zo stank.

A-greiz e galon, an azen

A douze, flour, al letonenn.

« Jerom, emezañ, ne ra forz,

Pe rouz pe zu 'vez an dorz,

Debri a ra ouz ar pezh a vez

Gand ar pezh 'zo, greom meurlarjez. »

Ar hi, puchet en e gichenn,

A lavar dezañ evel-henn :

« Te 'wel ahanon, va mignon,

O hlaourenna gand an naon ;

En eur beuri, tro da gein,

Amañ, tostoh d'ar bern mein ;

Va zamm-kreun, en eur mouchouer

A welan stag war da dailler.

Êz e vezo din her paka

Hag ober eul lein ar wella. »

Grig ebed a-berz an azen

Re hwek e kave ar melchen.

« En an' Doue, mignon ker,

Distro eun tammig da dailler. »

« En an' Doue, torrpenn ma'z out,

(Hag an dra-mañ 'tlefez da houd),

Desk en em voaza da yun,

Ken a vezo Jerom dihun.

Souden e savo, 'm-eus douet.
Pellig mad 'zo ema kousket.
Pa zihuno, dit e troho,
Euz an drorz ar pezh a garo.
Ha marteze, war ar marhad,
Amann en daou du, eun trohad.
Da hortoz e rafes brao,
Starda da gov gand da bao. »
Hag eñ da beuri a-nevez.

Etre daou, eur bleiz a zegouez
Ha c'hoant gantañ, kaoud kig azen.
« Va mignon ki, deus d'am divenn. »
Ar hi, puchet war e lost,
A respont : « Kemer ar post,
Da hortoz ma savo da vestr.
Dishual out ha digabestr ;
Galoup kuit d'an daoulamm ruz
Ken a vezi eet a-guz.
Me 'rank chom da zeski yun
Ken na vezo Jerom dihun.
Leinet eo dit ; petra 'hedez ?
Mar gra dit Gwillou re a bres,
Distag gantañ eur ruadenn
Ken a welo nao steredenn. »
Mez a-raog m'en-doa peurgomzet
An azen paour 'zo diskaret.

Kalon galed ouz an estren
A gouez truez en e gerhenn
Dioh ma ri,
E kavi.

Pemped lodenn

Ar goabrenn zu

Sell 'ta, Gwillou, sell 'ta du-hont
Na pebez goabrenn zu o tond !
Me a glaoustrfe 'zo gwall gelou
Gand hounnez en he bouzellou !
Ya, hounnez 'zo tan ha kazarh
Pe n'eo ket me Kolaz.

Allaz ! Allaz !

Gwiniz, segal, nag heiz, na kerh
Ne jomo netra war he lerh !
Ma ne deom ket oll da anaon
E tizehim, sur, gand an naon.

Ya, d'ar bloaz-mañ, ya, ya, en eun taol, ha raktal,
Ez eo greet deom or stal.

« A ! A ! » eme Gwillou

Leiz e vegin

O c'hoarzin. »

« Setu aze, avad, marvaillo !
Evidon-me, ne welan ket perag
'Ve gand hounnez kemend-all a strak.

Hounnez ? glao 'zo ganti.

Me 'lavar ; ha vad a rey

D'ar gwiniz, d'ar segal, dr'ar herh, d'an heiz.

Hanter muioh er parkeier,

Hanter muioh er foenneier !

Peadra da gas d'ar marhad,

Peadra er gêr da chaokad ;

Foenn d'ar chatal ha druz ha dizale ;

Bara gwiniz d'or bugale ! »

Setu aze 'vad ar marvaillo

Hag a blij d'ar paotr Gwillou !

« Pa lavaran dit, eme Golaz,

Hounnez, kazarh eo a daolo ! »

Hag eñ, o krena e ziouskoaz :

« Kazarh ruz, evel na welas

Den biskoaz ;

Bremaig, te a welo ! »

« Me 'lavar, me, eo glao eo a vezo,

Hag ezomm braz a zo ! »

Eme kerkent ivez ar paotr Gwillou.
Hag eñ kerkoulz, savet war e gillou :
« Me 'lavar kazarh ». « Me 'lavar glao ! »
Kazarh alese ha glao ahann...
Evid miroud ne zavfe kann
Mamm-goz a zegouezas brao.
« En an' Doue, 'mezi,
Lezit ho trouz hag hoh harao,
 Pe gazarh, pe hlao.
Petra ze ? Ne dalv ket grozmoli !
Bolontez Doue bezet greet... »
Rezon he-doa 'r vamm-goz, rag setu amañ 'r fêt :
Eun taol avel a hwezas
A-berz Doue hag a boulzas
 Ar goabrenn zu a-dreñv
 En tu all d'an Neñv ;
 Ha brao
N'oe na kazarh na glao.

Ar pod-houarn hag ar girin.

Beza 'oa, er memez kegin,
Eur pod-houarn hag eur girin.
Eun devez, ma'z oa eet an dud
Da vrennika war ar palud,
Ar pod-houarn, war e oaled,
En em inouas, me 'ziskred,
Hag a lavaras d'egile :
« Ha ma rafem eun dro vale ? »
« Goap a rit, eme ar girin,
Pe c'hoant braz ho-peus da hoarzin.
C'hwi, sur, kenderv tridroadeg,
A zo ebat deoh prezeg.
Mez, siwaz ! heb troad, heb askell,
Penaos lakaad tro em estell ?
Nann, kenderv, n'eus ket a du.
Me 'jom da grañchad el ludu. »
« Selaou 'ta, eme 'r pod-houarn,
Me a grogo en da skouarn,
Ha tamm a-ruz, tamm a-ruill,
Ni 'raio hent dioh an druill. »
« Mez dreist ar vein hag an toullou
Penaos a-ruz pe a-ruillou ? »
« Ni 'glasko eun hent plên,
Eun hent ha didoull ha divên. »
« Ho kostou-c'hwi a zo kaled,
Mez ma re-me ne dint ket.
Me, gand an disterra stokad
A vezo lakaet e skolpad. »
« O ! Kee 'tao ! Me n'on ket dall.
Etrezout hag an traou all
Pa zeuint tost me 'n em lako,
Ha stokad ebed n'e-pezo ! »
« Mad, emezi, deom 'ta, neuze,
On-daou 'n avañtur Doue. »
Ar bourmenadenn a oe berr.
Kalz re dano ez oa 'l ler
War gostennou ar pod pri.
Edo dija flastret e fri,
Ha diskolpet e ziouskouarn.
Gand e vignon ar pod-houarn,
Pa deuas eun diweza lamm

D'e lakaad etre pevar damm.

Mond da heul ar pennoù uhel
'Zo dizasun d'an dud izel.

Ar skoul hag an eostik

Beza 'z oa eur skoul glaz, tager euz ar gwasa,
Hag a ree tro-war-dro eun distruj ar brasa.

Kaer o-doa 'r vugale, krial,
Evid hen dichoual,
Kaer o-doa mamm ha merh
Ober hu war e lerh,
Hag evid divenn o yer
Taol outañ mein ha bizier,
Atao, heb mankoud tamm,
E kase gantañ e zamm.

Eun devez koulskoude, kaer en-doa fureta,

Ne gave netra da blaouia.
Kra-kra-berr edo war yun
Adal ar zadorn d'al lun.
E-pad ma nije sioulig,
Sada ma kouez war eun eostik.
Hag hemañ, ma zo eun druez,
Da houlenn outañ e vuhez :
« Aotrou, petra 'reot-c'hwi ganen ?
Krohenn ha pluñv ne gavot ken,
Sellit : me a zo ken treudig
N'eus ket ouzin eur begad kig.
Me n'on mad nemed da gana.
Me 'gano deoh va zon gaerra ;
Eur zon hag a zo bet, gwechall,
Kanet gand Matilin an Dall
E Pariz dirag ar Roue.
He hlevet ho-peus, marteze :
An hini goz eo va dous. »
« Petra 'n dra-ze ? gad pe lapous
Mad da derri naon ar skouled. »
« Nann, aotrou, c'hwi 'ya da weled
*An hini goz 'zo eur ganaouenn
Vrao, eun drugar, koant ha laouen,
Savet gand Yannig-penn-an-dañs
Da zeski dañsal d'an Noblañs. »*
« Neuze, paour-kêz, netra ne dal'.
N'em-eus c'haont ebed da zañsal.
Kompren, abaoe disadorn
N'em-eus ket bet leiz eur bigorn.

Er bed all fenez

E kani 'n hini goz,
Eun drugar.

Kov goullo 'zo bouzar.

An daou gudon

Daou gudon³⁹, er memez gwezenn
A ren o-daou o heusteurenn ;
O-daou ganet er memez deiz,
O-daou savet er memez neiz ;
O-daou koant, ma'z oa eun drugar,
Glaz o bruched, ruz o diouharr,
War gern o fenn bouchou briket,
En o eskell pluñv arhantet,
Mantellou voulouz, war o chouk,
Kelhiou aour en-dro d'o gouzoug.
Ha dreist-oll, kalonou tener.
Beav 'reent o-daou dibreder.
Gwir garantez, da heul yehed
'Zo gwrizienn ar gwir eürusted.
Eun devez unan, koulskoude,
A zoñj lavared d'egile :
« Me 'zo 'vond da vale bro »
« Ha da hortoz ma vi distro ? »
A respont dezañ, e vignon,
« Mantri a rez va halon.
Soñj mad petra 'rez da ober,
Sell pegen kriz eo an amzer ;
N'emaom-ni ket e-kreiz ar goañv ?
Kement ha mond, gortoz an hañv.
Deh, a veg eur wezenn aval⁴⁰,
E klevis eur vran o vragal.
Hi 'lavare : « Kuitaad e vreur,
A zoug peurliesha maleur ! »
N'ouzon ket, petra 'zoñji-te,
Mez, a-dra-zur, evidon-me,
Ne vezo, noz-deiz, em spered,
Nemed sparfelled ha skouled.
Avel a zo ha glao a ra,
An noz a zeu... kant ha kant tra,
Mil ha mil aon... ha marteze
Heb tamm d'e goan, heb toull gwele,
Va breur paour, mez re ziwevad,
A welo, 'lavaran mad. »

³⁹ Daou gudon : gwregel eo "kudon". Lakaet eo bet gourel gand Kere.

⁴⁰ eur wezenn aval : eur wezenn-avalou, evel just.

Ar beacher eun tamm muioh
A gemeras eur zoñj furroh.
Mez ar c'hoant da weled broiou
A oe treh d'an oll guzuliou.
Respont a ra : « Selaou, va breur,
Me zistroio, a-abarz nemeur,
Da gonta dit va beachou,
Da zeski dit ar helachou.
An neb a jom e korn e glud
Ne anavez na bed, na tud.
Evid deski eo red gweled.
O veachi e teu spered.
Me 'lavaro : « Eno edon,
Kleved ha gweled a rejon. »
Ha te, d'az tro, ouz va hleved,
Koulz ha me, 'zeblanto gweled.
Kenavo, breur !

« Kenavo ta,
Pa rankom on-daou kimiada. »
Gwella 'rejoint. Ar pourmener,
Douget war diouharr lijer,
En eun taol-kont, 'zo eet a-guz.
Pell braz, e vreur karantezuz,
E zaoulagad beuzet a zour,
A zell war-lerh ar beachour.
Etre daou, sada dirollet
Eur barr-amzer, ar seurt n'oa bet !
Tan ha kurun, glao hag avel,
Ken a grene douar Breiz-Izel.
Ar hudon paour, war eur wezenn,
A gav eul lastez dishlavenn⁴¹
D'en em houdori, eur pennad.
Ahano, war-lerh eur barrad,
Glebiet oll hag oll strafuillet,
Du gand an naon ha diousklufet⁴²,
E soñj klask eun dra da goania.
Goude bale, goude poania,
E welas greun war eur pengenn.
Mez dindanno, gand eun neudenn,
Stignou kuz a zo antellet.

⁴¹ dishlavenn : disglao.

⁴² diousklufet : kluchet (?)

Setu ar hudon strobinellet !
 An neudenn (e pe daol chañs),
 A zo hanter-vrein, emichañs.
 Rag a-bouez sach a ; kilzacha,
 Pilgammad hag en em ruilla,
 A-daoliou tourt, a-daoliou beg,
 En em gav adarre dispeg,
 Pistiget-oll, leun a gaillar.
 Eur pennad neud en-dro d'e harr,
 En em denn kuit, gwella ma hell.
 N'oa ket gouest da nijal pell.
 Diskenn a ra war eur houldri,
 Da ziskuiza e izili.
 « Tommet mad eo bet ar zoubenn,
 Emezañ : ar penn-mañ 'r gudenn
 N'eo ket bet êz da zibuna.
 Kenta gounid, koll diweza,
 Kollet em-eus, me 'hounezo ;
 Ne zoñjom ket c'hoaz en distro. »
 D'an ampoent e wel daou sparfell
 O tond ker prim hag an avel.
 Hag i o-daou, paravia,
 War-zu ennañ, alegenta.
 Keit ha m'edo, diwar e benn,
 An daou skoul oh en em zispenn,
 Hep soñjal kalz er pezh a ra,
 Gand e strufuill en eun ti ez a.
 Eur bugel a oa er houldri.
 « Sell, emezañ, pebez c'hoari !
 Hag e peleh e teu hemañ ?
 Deom da hoari horell gantañ. »
 Hag a-daoliou baz, e klaske
 Terri e benn ouz an dube⁴³.
 Ar maro, war a leverer,
 A rank gortoz ma sko e eur.
 An taoliou baz, an taoliou mein
 A gouez oll e-biou d'e gein.
 Difaziet e sklol ar boan,
 Etrezeg e di ker buan,
 War-nij, war droad, er hizma hell,
 Heb chom da houlerhi pell

⁴³ an dube : evid ar rim (?).

Ez a.

Beteg hanternoz

'Oa chomet e vreur d'e hortoz.

D'an neb a gred, a-houdevez,

E kaver a-bell meurlarjez,

E respont, diwar dreuz e zor :

« Nann, nann, m'her goar dindan eñvor :

Skiant-prena

Skiant gwella.

Al louarn besk

Eun devez, eul louarn,
En eur griped houarn,
A oe tapet e lost,
Ma savas gantañ c'hwez ar rost,
Rag, ar griped a zalhe, stard
 Lost or hanfard.

« Sed amañ 'vad, eme 'l louarn,
En eur skrabad e ziouskouarn,
 Eul lardouseenn,
 D'am gortozen !

Paket on ; da betra nah ?
Ha penaoz dilasa 'r zah ?
Gand esperañs ha dour yen
E vez bevet meur a zen.
Meur a griped a zo bet stignet
Hag e nikun ne don bet dalhet.

 Euz hemañ,
 A gredan,
M'en em denno c'hoaz
 A-barz arhoaz.

Med pe hiz en em gemered ?
 Red eo gweled. »
 Setu-eñ, ragtal,
 Da zoñjal.

« Pedi 'zo mad, a lavarar,
Mez me ne ouzon ket va fater.
 Terri ar griped
 Eñ 'zo kaled.

E gas ganen da redeg bro ?
Re bounner eo ; n'esu ket a dro.
Troha va lost ? Hag eur zizaill,
Da grenna va zamm apouaill⁴⁴ ?
En em gemerom evel-henn. »
Hag eñ ober eul lamm krenn.

 Terri e lost,
 Ha d'ar post,
Endra 'helle, war-zu e di,
Evid palastri ar gouli.
Evel ma'z oa eul loen fin,

⁴⁴ apouaill : apoueill.

Ha zoken lastez medisin,
 E teuas adarre yah-pesk
 Nemed, siwaz, e chomas besk.
 Eun nebeud goude, lern ar vro
 A zalhas kuzul etrezo.
 Al louarn besk a ya da heul,
 Puched a ra war e zeul
 Da zealou.
 Etre daou
 E teu e dro da gaozeal :
 « Ez-leal,
 Emezañ,
 Mad kenañ,
 Hoh-eus parlantet, Aotrounez,
 Ha meuli a ran ho furnez.
 Eun dra, koulskoude, 'zo chomet
 Ha n'en-desu nikun lavaret,
 Perag stleja, der ar vouillenn,
 Eul lost keit hag eun anduillenn ?
 Ma ve krennet 'nei 've skañvoh,
 En hent e vem dizañjerroh ;
 Netar nemed or harailla
 Ne ra :
 Trohom ol lost ! »
 Unan, a yoa dezañ tost,
 A ziskredas, n'ouzon ket perag,
 Warnezañ eun dra bennag.
 War nezu ober eur strevidaenn
 E taol eur zell war e bladenn,
 Hag e wel, heb mar,
 Disto toull an dar.
 Sada, kerkent, d'ar stravelgen,
 Ma soñj larda eur grampouezenn.
 « Lan, emezañ, te 'gaoze mad.
 Anad ez out alvokad.
 Mez p'eo te a ro an ali,
 Eo red komañs dre da hini.
 Distro amañ da gillorou
 Ma roim e varo d'an Aotrou. »
 En despet dezañ, al lampon
 « Zo astennet war al leton.
 Pa oe gwelet e doull talar,
 Arnevet oll ha dirapar,

E savas eur c'hoarz, eun dourni,
Eun hemolh hag eur jolori
Ma rankas ar hêz dilostet
Mond gand ar vez d'en em guzed.
Lost ebed, a helled kompren,
Ne gouezas dindan an heskenn.

Meur a ganfard e Breiz-Izel
A lavar : « Red ober brezel
D'ar relijion, d'ar seurezed,
D'ar veleien ha d'ar frered. »
Sellit a-dreñv hag e weloh
Eo tud besk a barlant ouzoh.
Mond da glask diskar ar prizon
Eo diskouez mad ez fripon :
Ha mond da zispenn an Iliz
Eo dikouez ez eur kofiliz⁴⁵.

⁴⁵ kofilis : Pe “koñfiliz”, a dalv kement hag “eur vi bet goret gand eur yar”. Amañ ?

An azen hag ar hi bihan

Gand an tu da blijoud, a zo eur berlezenn
Ha ne zao ket e peb istrenn,
Kredit hen : ma n'her hredit ket,
Selaouit eun dra c'hoarvezet.

Nag ar bed a zo drol, a lavare 'n azen.
Koll a ran va skiant, pa welan o tremen,
Eun dra dreist-oll souezuz.
Lod a blij, lod 'zo hegasuz.
Gwelit Azor. Eun tamm ki,
N'eo ket brasoh evid va fri ;
Mad, hennez,
Ha bemdez,
E-pad ma taoler ouzin mein,
A vez dezañ flouret e gein,
Gand an Aotrou, gand an Itron,
Da beb mare, e pep feson,
E vez greet anezañ stad :
Bara lardet, tammou kig gad,
Soubenn al lêz, me 'oar petra ?
Ha koulskoude, petra 'ra ?
Rei e droad, ober chiboudig
Ha da heul eun harzadennig,
Setu toud : Sevel e bao...
Evid kement-se atao
N'eo ket diêz. Ober brazig ?
Eur pezh kaer ! Eun harzadennig ?
Dre hras Doue, beteg-henn,
N'eo ket siferniet va hornaillenn.
Sokendellienn !⁴⁶ me a welo
Pe gi, pe ve⁴⁷, a hounezo.
Gand ar zoñj-mañ, en e spered,
E tremen an noz heb kousked.
Antronoz vintin, er flourenn,
E welas e vestr o pourmen.
Sada 'n azen o vond, a-gammedou gorreg,
Ha sevel e rafe e bao louz ha bleveg

⁴⁶ Sokendellienn ! : (?)

⁴⁷ ve : (?)

War benn skoaz an Aotrou,
Ha da heul, a-leiz e henou,
Distaga eur pezh blejadenn,
Ken a dregernas an dachenn.
« Petar, eme 'n Aotrou, a glask hemañ ouzin ?
C'hoant da zañsal pe da hoarzin ?
C'hoarzin a rey,
Dañsal ive'
Heb dale.
Rag bremaig e sono stard
Ar vombard. »
Hag eñ, paka eur geuneudenn
Da rei fest ar vaz d'an azen.
Hemañ, pa glevas ar zon,
Heb dale pell, a jeñchas ton.
Ken mezeg ha tra, da houde,
D'e vab bihan e lavare :
« Er penn kenta euz va amzer,
E veven e ti eur meiller⁴⁸
Hag a gane, m'oa eun dudi,
Eur zon a zo mad he deski :

Va zud, chomit en ho pragou
M'hoh-eus truez ouz ho pennou,
Ha, nemed c'hoant ho-pe da yun,
Prenit ho korn, diho ho putun. »

⁴⁸ eur meiller : eur miliner.

Peronel hag he fodad lêz

Peronel, war he fenn eur podad lêz mintin,
Gand eun troad lijer ha mibin,
Ker skañv hag an avel,
A ya war-zu Kastell.
Evid galloud beza 'r genta
Ne jome ket da varhata.
En eur vond e lavare :
« N'eo ket evid fouge,
Mez, a-dra-zur, hirio an deiz,
Me 'm-bezo arhant a-leiz
Rag al lêz a zo mad
Ha dienn warnañ eun trohad.
Gand ar priz, me 'breno viou,
Eun dousenn, marteze diou.
Just ha just, va diou yar vriket
Da glochad a zo komañset.
Setu din, a-barz nemeur,
Yer bihan braz a-leiz va leur.
Selaou, Alanig al Louarn,
Sur e kolli da ziouskouarn
Mar degasez begig da fri
War-hed tenn da zor va houldri.
Gand arhant an daou dorradig
Em-bezo eun tamm pemohig.
En despet dezañ e lardo,
Rag brenn 'zo ar pez a garo.
Priz mad 'zo war ar moh lard
Ha p'her gwerzin, me 'zalho stard.
En e leh, me 'breno eur vuoh
Ha leue d'he heul, a zo kaerroh.
Deus 'ta, buohig, deus da beuri,
Te 'welo da leue o c'hoari.
Sell anezañ : Dija e lamm
Ken uhel ha kerniel e vamm.
Talvoud a ra eul louiz aour !
Fring atao, va loenig paour.
Me 'fringo da heul mar kerez. »
Aotrou Doue, pebez distres,
Skuillet al lêz : kañv d'ar viou,
Oh ha buoh 'zo eet e-biou.
« Sed amañ 'vad eur fritadenn

Hag a lardo va diou feskenn.
Rag Jerom ne hortoz ket pell
Evid terri neudenn ar poell.
Greet em-eus eun devez brao !
Va zad a lavare 'tao :
"Mond da vlejal : Ar had ! ar had !
Eo he lakaad da haloupad". »

Fouge re abred, a-wechou,
A ra terri ouspenn podou.

Ar haz hag ar marmouz

Jilez an orbider, marmouz euz ar falla
Ha mignaon⁴⁹ lip-dienn, kaz euz ar re laerra,
Evel daou vreur, er memez ti,
A veve drant ha dizoursi.
Mignon ar mestr 'oa Dom Jilez
Ha mignaon mignon ar vestrez.
Setu amañ penaoz, heb beza kannet tamm,
E hellent, koulz pe goulz, ober meur a dro-gamm.
Dom Jilez pa veze paket
Da viroud na vije kannet
A zidostae, d'ar piltroorig,
A ree deg-ha-deg chiboudig,
A buche, war al leurzi,
Kroaziet e zaouarn da bedi,
A ree kant-ha-kant mil orbid
Koulz pe well hag eun tad ermit.
En eur skei war boull e galon,
Atao en-deveze pardon.
Mignaon euz e gostez, pa gleve c'hwez ar rost
Luch e lagad ha sonn e lost,
A rede da gaoud e vestrez.
Ober a ree tregont arvez :
En em dorcha ouz he lostenn,
En em ruilla war he barlenn
En eur lavared, hed-da-hed,
E gredo hag e japeled.
Atao e-leh fest ar vaz
E veze flouret kein ar haz.

Grit arveziou, parlantit flour,
Hag e veh faoz evel an dour,
C'hwi a vezo deuet mad
Gand mamm ha merh, gand mamm ha tad.
Goap a rit ? N'eus forz a ze.

Kalon an den a gar foug.

⁴⁹ mignaon : unan hag a zo mignon braz da...

Al leon hag al loen korneg

Respont da hirvoudou ar barz

Sioul an avel, plên ar mor,
Eul lestrig e oueliou digor,
A red dizamm war gein an dour,
Salo bagig ar Pesketour !

Rag-se eta, na welom ket :
An dizurz a vo chadennet ; O ! ya,
Ma rank ar Pap leñva hirio,
Pa deuy warhoaz, eñ a hoarzo !...
Pèr a zo mên ha mên kaled ;
O skei reer, mez ne fraillo ket.
Nag a bed, a-raog rei daou daol,
A dorro, warnañ, ho morzol.

C'hwehved lodenn

Rimadellou

Bloavez mad

Koz ha yaouank, gwitibunan,
Bloavez mad deoh a reketan.
Dillad didoull war ho tiskoaz,
Labour didorr, yod silet poaz,
Kerh ha gwiniz leiz an irhier ;
Kaol ha panez er parkeier,
Krapouez lardet a-gorvadou ;
Amann melen leiz ar ribot,
Da gousked beb a wele blod ;
Eul lomm gwin-ardant d'ar gwazed,
Eun tasad kafe d'ar merhed,
'Hed ar vuhez kalon laouen
Hag en Neñv, beb a gurunenn.

Kanaouenn an alhweder

Sant Pèr, digor din,
Biken mui ne behin.
Digor 'ta, digor,
Digor din da zor ;
Kemer truez ouzin,
Pe va gouzoug a dorrin ;
Sell, an douar, pegen izel,
Ha me pegen uhel !
Bouzar out ?
Pe ne dout ?
Mouzad a rez,
Hag e rez ?
Mad, Pèr, gra da benn,
Me 'zo 'vond da ziskenn,
Hag adarre e pehin
Hag e rin, rin, rin.

Kanaouenn al laouenan war skourr ar wezenn

Dir, dir, dir,
Ma ne dorr ;
Torr 'ta, torr,
Te 'zo dir ?

Ar pemoh-gouez

Ar pemoh gouez, , er briz-koad
A gousk e-touez an deliou ;
Me 'gav roud e bevar droad,
Fresk-beo en oll ribouliou.

Eüruz e vo an tenn
Hel ledo mik war an dachenn.

Ar pemoh gouez er briz-koad
A gousk e-touez an deliou.
Me 'gav rodu e bevar droad
Fresk-beo en oll ribouliou.

Son an Aotrou Fañch

I

Aotrou Fañch, selaouit, eun tammig,
Frank ho tiousskouarn ha sonn ho penn ;
Me 'ya da gana deoh eur zonig
Hag a dle ho renta laouen.
Devez ho kouel, eo sur an devez
Ma tle an oll ho saludi !
Aotrou Fañch, hervez ar hiz nevez,
Ni 'ginnig on ezañs d'ho fri.

II

C'hwi 'zo eur hrouadur ar c'hoanta,
Askornet mad, rabotet flour ;
Eur halvez euz ar re zesket.
Dibaot a ra brasoh labour
Pa hobari gand e gizellig
Poltred eur zant, er prenn kaled.
Aotrou Fañch, da ober eur zantig,
Gwell piltos n'oufed da weled.

III

Ho pleo, gand lard-teuz amannennet,
A rezennit war gorn ho tal ;
Heñvel ouz daou vigorn marellet
Ho taoulagad a zo brao ral ;
Mez evid merhedigou Sant-Salver
Me 'gav anezo gwall-lipous !
Aotrou Fañch, pedit eur gweraer
D'ober deoh eul lunedou rouz.

IV

M'ho-pije bet eun troatad muioh,
Plomm, 'vel ma'z oh-c'hwi en ho sa',
E hellfeh ober, koulz pe wellloh,
Eun "tambour-major" ar brava ;
Ar poultr - kavet eo, siwaz dija, -
Ho-pije, sur on, iñvantet ?

Aotrou Fañch, beteg 'r wezenn bella
Ho penn-c'hwi a zo bet stoket.

V

N'eo ket diwar dour ha patatez,
Eo savet ker ront ho pruched ;
Ho kenou, flañchet en daou gostez,
A zoug eur rastell mad-lemmet.
Nebaon, c'hwi 'gar mad eur frigousenn⁵⁰
Hag en he serr, eul lommig gwin !
Aotrou Fañch, pa welan ho kesten⁵¹,
Me 'ziskred eo mad ho skin⁵².

VI

Mar degouez deoh dimezi, biken,
Va hredit, c'hwi 'vezo betet⁵³ ;
N'eo ket kement o-deus atoudenn
A gav, d'o hoan, krampouez lardet ;
Me 'gred kentoh e kavfeh, siwaz !
Bara seh ha kerniel butun !
Aotrou Fañch, chomit 'ta didrabas
Pe, 'm-eus douet, c'hwi a ranko yun.

VII

Ez-leal, c'hwi 'h-eus re a spered
Evid beza ken direzon ;
C'hwi jomo difring 'n ho kaoued
Da larda, evel eur habon,
Hag a hoapaio 'r merhed yaouank
Sonn ho kribell ha dibikouz.
Aotrou Fañch, krouadur divank,
Er font⁵⁴, gwell eo chom dihabouz⁵⁵.

⁵⁰ eur frigousenn : ?

⁵¹ ho kesten : ?

⁵² ho skin : ?

⁵³ betet : ?

⁵⁴ Er font : ?

⁵⁵ dihabouz : ?

Seizved lodenn

Morvan Kêrgounnar ha Paotred ar sabat

Sklêredigez

Morvan Kêrgounnar hag e gomper Joen a zo daou zen diwar ar mêz euz a-gostez Treger. Morvan eo gourener braz ar vro, ledan a ziskoaz, iziliet stard, stag mad ouz an douar, iskuit a beb leh, plomm en e zav evel eur gannabenn, mez peñvers ha difeiz ; ne gred nag e Doue nag e diaoul ; e Zoue, eo ar voutaill ; e bedenn, al leoudoued ; e êl-mad, e bennbaz dero. Joen a zo eur hristen evel an oll, hag a glask distrei e gomper da voned d'ar gêr en noz, en eur zanevelli dezañ darvoud Alan-ar-Glaouer, ha troiou yud paotred ar zabat.

Paotred ar sabat

Joen, va homper

An noz a zo teñval ; glao hag avel a ra ;
En an' Doue, Morvan, n' da ket en hent brema'.

Morvan Kêrgounnar

Ha pa rafe luhed, kurun, avel ha glao,
Sell, troet eo em penn, d'ar gêr me a yelo !

Joen

Troet eo en da benn ; mad, Morvan gêr, diwall :
Diwall 'lavar an dit, pe e tapi da fall ;
Er poent-mañ deuz an noz, 'vid deizioù meurlarjez
Kred ahanon, Morvan, gwall jañsou a hoarvez ;
Gouzoud a rez ar brud a ren, pell 'zo, siwaz,
War ar skrijou spontuz a glever er hoad braz !

Morvan

Setu-te adarre ! Kea, va homper Joen,
Ne deo ket ganen-me eo dit c'hoari 'n azen :
N'eus diaoul en ivern, na Teuz war an douar
A hallfe ober aon da Vorvan Kêrgounnar !

Joen

Gwir eo, eur paotr reud out, hag eskopti Treger
N'en-deus ket marteze eur startoh gourener :
N'eus forz ! Paolig a ro meur a lamm-chouk a-benn
Da dud a zo gouzieg koulz ha te da houren.
Soñj az-peus, a gredan, euz a Lan-ar-Glaouer !
Unan all adarre ! Tanfoeltr, pebez taol kaer !
Pari, ma vez beuzet o koueza en eul lenn,
A-raog erruoud er gêr, e ve yen ar zoubenn !
Ahanta ! Set' eno penn-da-benn tro Alan.
En deiz all o tistrei deuz eured Kêr-al-Lann,
En em gavas strinket hag evel eur paotr fin
E lonkas re a zour evid trempa e vin.

Morvan

Piou 'hallfe e damall ? Mez daonet 'vin, avad,
Mard deus netra ennañ gouestl d'ober aon d'eur had.

Joen

Nann, Morvan, ma vefe hervez ma lavarez !
Mez o liva gevier 'out adarre, paotr kêz.

Morvan

Mar de', war da veno, beuzet Alan el lenn,
E tlefe kaoud eun den kelou euz e grohenn.
Petra 'ta, kaer 'zo klask, n'her haver e nep tu
Mui eged ma ve deuet, korv hag ene ludu.
Red eo, n'eus mar ebed, pa jom keit dianket,
An diaoul e-uann en-defe her sammet,
Ha marteze, dampred, 'vid deski ober glaou
Pe dezañ pe d'e wreg, evito o-daou.
Dalh mad aze, Joen.

Joen

Kea, kaer 'po kaketal
Ne dreho ket da hoarz war gredenn ar re all ;
N'eo ket me hel lavar, mez goulenn dioh Job koz
Ma n'en-deus ket klevet war-dro an hanternoz
Eun doumpi estlammuz, e-keñver ar hoad braz,
Ha mouez Alan e-touez, o krial forz, allaz !
Goulenn c'hoaz digantañ, ma n'en-deus ket klevet,
Dre ar pella e vouez evel skrijou loened
'Tal mênhir ar hroazhent, a)unan o yudal :
« Eur wech all e teui ganeom-ni da zañsal ! »

N'her hredez ket, moarvad ? Re galed eo da benn
'Vid ma hallez kredi 'r pezh a gred pep kristen,
Med n'out ket evid nah, anez eur gaou marvel,
Penaos eun dra bennag 'oa 'n noz-se en avel.

Morvan

Sell 'ta, ne ouien ket ! Mez n'eus forz petra 'oa
Ar pezh 'zo bet neuze n'ema ket da zond brema'.

Joan

Nann, mez allaz ! Morvan, ker gwaz 'hall erruoud
Ha n'ouzon ket perag e krenan evdiout.

Morvan

« ken a vo ;Mad, kren 'ta ; me roio amzer dit da grena,
Ne deo ket eur penn den, az-peus war da ziou skoa',
Mez eun irvinenn hriz ma'z eo gwir e kredez
Evel eur bugelig kemend a ranerez.
Gwell eo ganen gouren gand an oll diaoulou
Eged selaou pelloh eur seurt rimadellou,
Huñvreou gwrahed koz, - rag-se, kenavo :
Mar deu Paolig d'am hlask, me hen diarbenno,
Ha mar deu tost din-me, pe me 'vo daonet, sell,
Pe set' amañ eur vaz a grenno e gerniel.
Kenavo.

Eur vouez all a grias kenavo :

Ne oa ket mouez Joan, nag hini neb den beo,
Mez mouez eun dra bennag, a oa euzuz, iskiz
Evel mouez an Ankou p'en-devez naon e breiz.
Kement-mañ 'hoarvezas da noz meurzh an Ened⁵⁶.
Eet da veurlarjeza da di e vignoned
Morvan a zistroe gand e gomper Joan
Pa'z eas en ti gantañ da dana e bibenn.
'Vitañ n'oa ket mezo, na zoken tamm tommet.
N'en-doa ket kollet c'hoaz ar gwin en-doa evet.
Mez ar pezh a rente aonig e gamarad
Ne oa ket 'balamour n'en-dije re govad.
Rag gouzoud a ree mad, gand kalz muioh ouspenn,
Morvan a zibradje e garr deuz ar vouillenn.

⁵⁶ meurzh an Ened : skrivet "meurzh an Evned" gand Kere. Sur ez eus eur fazi.

Mez, allaz ! ne oa ket, ha n'ez eus bet morse
 Eun diaoul eveltañ evid toued Doue.
 Bep kammed a raje ne oa deuz e henou
 Nemed tan ha kurun, malloz, droug-pedennou :
 Poan a raje dezañ ma vije en ivern
 Eul leou-douet bennag a rankje da espern.
 Koulskoude an deiz-se dreist an deveziou all
 Ne oa nag e skiant nag e deod da damall,
 Rag dond a reent gantañ, dindan eñvor, ar brava,
 A-gichenn ar henta beteg an diweza.
 Kement-se hag ouspenn tro ar paour-kêz Alan
 Eo a lakae Joen da grena 'vid Morvan.
 'R pez a venne Joen, 'oa mennoz eun den fur.
 Deuet e oa deiz ar varn, barreg e oa 'r muzur ⁵⁷!
 Morvan en-devoa c'hoaz eun troad war an treuzou
 Pa deuas da derri unan euz e voutou,
 Ha diohtu e klevas tostig en e gichenn
 Eur vouez skiltr o laoskel evel eur hoar zadenn ;
 Mez kaer en-devoa klask goudevez tro-war-dro
 Ne hellas ket tizoud ar c'hoarzer divalo ;
 Rag-se, godue beza peurzreset e votez
 Ez eas ganti en hent 'vel ma vije nevez.
 Avel, grizill, kazarh, glao ha kurun a ree
 Hag ken teñval e oa ma ne wele banene.
 A-wechou, koulskoude, e seblante kleved
 Eun dra bennag en hent tost dezañ o kerzed.
 A-benn eur pennadig, setu eul luhadenn
 Hag a ziskouez dezañ, tostig-tost d'e jupenn
 Eur pikol a gi du, ker braz hag eun ounner.
 Daou lagad 'oa en e benn, kel lemm ha re eun naer.
 - Fouet, fouet, boued an diaoul, a lavare Morvan
 Fouet 'ta, boued ar gounnar : Mez ar hi ne ra van.
 - Gortoz, gand va fennbaz, me 'lardo da grohenn.
 E-leh harzal, ar hi a reas eur hoar zadenn.
 - C'hoarzin, O ! O ! paotred ! C'hoarzin ! eun aneval !
 Mad, bremaig, marteze, te 'raio eur c'hoarz all.
 Dao, dao, hag eñ raktal o preder c'hoari 'r vaz
 Evid bruzuna 'r hi a-daoliou ; mez allaz !
 Ar hi-ze ne oa ket deuz a jas an douar :
 - Kee goustad, emezañ, Morvanig Kêrgounnar ;
 Espern da nerz, Morvan, 'vid ma helli emberr

⁵⁷ muzur : muzul.

Diskouez deom o tañsal eo goeñv da zivesker.
 Kalz re a drouz a rez, gwell 've dit beza sioul !
 - Na pe a-berz Doue, pe a-berz an Diaoul
 E teuez da brezeg din ? Piou 'out ? eme Vorvan.
 - A-berz Doue ? goapaer, na gredez ket ennañ !
 - Nann ! n'eo ket euz e berz e teuan, kamalad,
 Mez a-berz an Diaoul a anavezez mad,
 D'an hini 'peus gwerzet da gorv ha da ene,
 Hag en-deus eur c'hoant braz d'az kweled hebdale.
 - Lavar dezañ gortoz ken a vo eun dro all ;
 N'eo ket mad va boutou ! Mez piou out-te, loen fall ?
 - An ene a zo bet en Alan ar glaouer !

Morvan Kêrgounnar

« Mad ! dalhet mad ah-eus ar merk euz da vicher
 Rag du ez out atao, du-pod evel al liou ? »

Ar hi du

« Ya, ya, roet 'zo din labour da ober glaou,
 'Vid da rosta du-hont, te ha da vignoned ;
 Mez selaou mad, Morvan, setu amañ 'n eured ! »

Kanaouenn Paotred ar Zabat

(pachpi)

Dañsom, paotred,
 Dañsom, merhed,
 Dañsom, fringom, nijom, loened.

Dal a-unan :
 Prim a droad, paotred,
 Dal a-unan,
 Dañsom buan ;
 En em zeskom
 Oll etrezom,
 Ken a baro al loar warnom !

Ha dal a-zaou :
 Prim e droad, paotred ;
 Ha dal a-zaou.

Mad ez a an traou ;
Dañsal en noz,
Oll diaoulou koz,
Setu eno or Baradoz !

Ha dal a-dri ;
Prim a droad, paotred ;
Ha dal a-dri,
Sachom warni :
An noz teñval
A zo brao-ral.
Deom-ni da hoari, da zañsal !

Dal a-bevar :
Hejom or garr,
Prim a drtaod, paotred ;
Hejom or garr ;
Pa vez arneu⁵⁸
Da rei dour-beu⁵⁹
Gand an higenn pesked a deu.

Ha dal a-bemp :
Prim a droad, paotred .
Ha dal a bemp :
Brao 'z a ganem ;
Meurz an evned⁶⁰
A oa bepred
An deiz ral da douza deñved !

Ha dal a-hweh :
Prim a droad, paotred ;
Ha dal a hweh :
Sachit ganeh ;
Ar horaiz,

⁵⁸ arneu : arne.

⁵⁹ dour-beu : dour-beo.

⁶⁰ Meurz an evned : meurz an Ened (= meurlarjez).

Deuet war e giz,
Ne dalv netra gand e zoubenn biz ?

Ha dal a-zeiz,
Prim a droad, paotred .
Ha dal a zeiz :
Gwell eo kig preiz ;
Pa ve 'n deñved
Dushualet
'Vezont re ampart da gerzed !

Ha dal a-eiz ;
Prim a droad, paotred .
Ha dal a eiz :
Stardom or preiz
Eun droig c'hoaz.
Bihan ha braz.
Hag e chomo ganeom ar gwaz !

Ha dal a-nao
Prim a droad, paotred .
Ha dal a nao :
Dañsom atao,
Greet eo ar stal
Kerzom raktal
D'an ivern da echui ar bal.

Neuze e oe klevet meur a darz kurunou
Evel taoliou kleier pa vent o son glaziou.
A-houdevez ne oa gwelet skeud a Vorvan
Mui 'ged ma vije lonket gand eun tarz tan
Koulskoude mar deo gwir 'r pezh a lavar Job koz
'Vije klevet bep bloaz da daol an hanternoz
Evid meur an Evned, 'harz mênhir ar hoad-braz
Eur vouez skiltr o krial : « C'hwi oll a zo beo c'hoaz
Kemerit skwer warnon : na douit ket Doue
Gand aon da zon'd, siwaz ! da zaoni hioh ene ! »